


Splann !

Ospitalioù publik

un distruj programmet,
ur marc'had evit ar gennad prevez



Splann ! he deus enklasket diwar-benn distruj reoliek an ospitalioù publik : koskor ha savadurioù, niver a weleoù hag arc'hantaouiñ. Un drailh programmet evit mat ar gennad prevez. Analizañ a reomp holl elfennoù un drailh programmet evit mat ar gennad prevez.



Ospitalioù publik : un distruj programmet, ur marc'had evit ar gennad prevez

An enklask embanned e miz Gouere ha miz Gwengolo 2025

Splann ! he deus enklasket diwar-benn distruj reoliek an ospitalioù publik : koskor ha savadurioù, niver a weleoù hag arc'hantaouiñ. Un drailh programmet evit mat ar gennad prevez. Analizañ a reomp holl elfennoù un drailh programmet evit mat ar gennad prevez.

Ouzhpenn 1.000 penn servij a roas o dilez eus o c'hefridioù melestradurel en ospitalioù eus pep korn-bro a zo e Frañs, e 2019. Ar bloavezh war-lerc'h, e-kreiz enkadenn ar C'hovid, edo an dud o sktrakal o daouarn ouzh o frenestr evit trugarekaat labourerien ar prederiañ. N'heller ket dioueriñ an ospital, padal ar bloaz-mañ e ranko an ospitalioù dioueriñ arc'hant c'hoazh : 700 milion a euroioù en deus divizet ar gouarnamant espern er gennad mezegel-ha-sokial a-bezh.

Splann ! en deus dibabet ober ur bilañs eus sistem an ospitalioù publik e Breizh : kartennoù dibar ha labourioù enklask ledan a ro tro deomp da wellet resis pegen bras eo an distrujoù war ur gwir diazez : ar yec'hed evit an holl. An trummadoù en arvar fall, an ospitalioù o klask arc'hant, a ya en-dro evel embregerezhioù, ar savadurioù distrujet, ar medisined diviget. Lod eus ar glañvourien n'ez eont ket mui da gaout ar medisin, hag ur sektor prevez a zalc'h e nerzh en ur marc'had o vont war-raok.

Isabelle Jarjaille, Caroline Trouillet, Raphaël da Silva

LODENN 1

TRUMMADOÙ O TARZHAÑ, KLAÑVOURIEN DA SILAÑ

p 7

Berregezh war ar vedisined hollek, diouer a vedisined arbennik e kêr : emañ an urjañsoù o vougañ en ospitalioù, lec'h ma ne baouezer ket da glask war-lerc'h labourerien ha gweleoù.

LODENN 2

AN OSPITALIOÙ PUBLIK A RA KOF MOAN... AR C'HLINIKENNOÙ A ZO DON O HINI

..... p 21

Ur reolenn arc'hantaouiñ nevez a oa bet lakaet d'an ospitalioù e 2003 : ar prizioù hervez an ober (T2A), a c'houlenn bezañ ampletus. Mont en-dro an embregerezhioù a oa hini ar gennad prevez dija, met distabilaet eo bet ar servijoù publi, rak rediet int da brederiañ pep hini, forzh pehini 'vefe ar priz.

LODENN 3

ISLONIK AR C'HOLLVEZHIOÙ, DAÑJER AR SAVADURIOÙ : OSPITALIOÙ EN ARGOLL

..... p 33

Rivinet e vez ospitalioù publik Breizh gant ar prizioù hervez an ober. Re izel eo deuet o gounidoù da vezañ evit gellout postañ arc'hant. O koshaat emañ ar savadurioù a vloaz da vloaz, avat, ha gortoz a reer ar sikourioù bet prometet evit adneveziñ anezho.

LODENN 4

EMAN OSPITALIOÙ PUBLIK O KLASK MEDISINED, HA TRUMM

..... p x

Engouestlet eo labourerien ha labourererezed an ospitalioù evit ar servij publik. Met ur verzherinti e teu o micherioù da vezañ. Kalz anezho a zo prest da vont d'ar gennad prevez da labourat, da gaout goprou hag aozioù labour gwelloc'h.

Bouest du

Titouroù sansupl ne foata ket d'an ospitalioù reiñ deomp

A-raok ma vefe embannet pennadoù diwezhañ hon enklask, e oa tri ospital o c'houlenn 5.500 euro ganeomp. A goaz de betra? Bezañ goulennet kavout teulioù a bouez hollek, diwar-benn gouarnerezh an ospitalioù publik. Displegañ a reomp deoc'h an afer-mañ, zo an afer frankiz kelaouiñ.

Stourm a reomp abaoe tost ur bloaz bremañ evit tapout teulioù melestradurel : danevelloù stadañ kuzulioù evezhiañ an ospitalioù publik. Hervez mellad 15 Disklêriadur gwirioù mab-den ha keodedour 1789, stag deus Bonreizh 1958 : « *pep hini neus ar gwir da c'houlenn kont gant an ofiser publik eus e velestradurezh* ». Koulskoude, lod eus an ospitalioù n'o doa ket c'hoant kas deomp an danevelloù-se. Setu ar pezh a c'hoarvez gant Ospital Roazhon, Ospital Brocéliande hag Ospital Gwitreg. Ouzhpenn-se, o deus goulennet ma vijemp kondaonet evit « gwall implij ».

Un arguzenn-mañ oa bet lakaet a-gostez gant ar Gomision evit mont e darempred gant an teulioù melestradurel (Cada) – un aotrouniezh dizalc'h a warant ar frankiz da vont e darempred gant an teulioù melestradurel – en ul lizher deiziet d'ar 7 a viz Mae 2025, met bet resevet ganeomp d'an... 29 a viz Eost. E-pad an dale-se, o deus goulennet an ospitalioù, digant lez-varn melestradurel Roazhon, « *kondaoniñ Itron Isabelle JARJAILLE [kenskriverez an enklask-mañ evit Splann!] da baeañ [...] 2 000 euros* » da Ospital Broceliande ha da Ospital Roazhon, da lavaret eo 4.000 euro. Ospital Gwitreg deus goulennet ivez, e penn-kentañ miz Gouere, ma vefe kondaonet hor c'hazetennerez da baeañ 1.500 euro.

Hervez menoz ar Cada, hon eus disidet dec'hen gant hor goulenn da gaout danevelloù stadañ an ospitalioù-se. Evel re an ospitalioù Rance-Emeraude, Dinan ha Sant-Malo, 'houlennamp c'hoazh dirak ar

lez-varn melestradurel Roazhon. Pierre Januel, ezel eus Kevredigezh ar Gazetennerien evit an treuzwelusted 'displeg : « Muioc'h-mui a ditouroù ne deuont ket betek an debat foran. A fe fall eo ar melestradurezhioù ha ne vezont ket kastizet. Ar gwir d'an treuzwelusted eo ar gwir bonreizhel. Met, e gwirionez vez diaesoc'h-diaesañ d'ar gazetennerien kaout an teulioù c'houlennont. Ben ar fin eo ur stumm prosezerezh minellan nevez. »

Skipailh embann Splann !

Petra eo Splann ! ?

Ar media kentañ gouestlet penn-da-benn d'an enklaskerezh e Breizh eo *Splann!*. Renet eo gant ur spered dizalc'h ha nann-genwerzhel. Krouet eo bet e 2020 gant ur strollad kazetennerien a zifenne ar frankiz da gelaouiñ diwar-benn an agro-industriezh. Ledanaet zo bet ar sujedoù enklask : kudennoù yec'hed, endro, reizhded ha frankizoù foran. Hep bruderezh, perc'henned, pe skoazelloù ar gouarnamant lec'hel. Kontrolled eo ar media Splann! gant e izili hepken, kazetennerien dreist-holl, hag arc'hantaouet gant ar pezh a ro an lennerien ha lennerezed deomp.

Heulit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial:



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann



splann.bsky.social



@splann@mamot.fr



splannenquetes




« Splann ! » :
quotidien d'enquête



« Splann ! » :
quotidien d'enquête

TRUMMADOÙ O TARZHAÑ, KLAÑVOURIEN DA SILAÑ

Ar gwir da vezañ prederiet a rankfe bezañ gwarezet da bep hini, noz ha deiz. Berregezh war ar vedisined hollek, diouer a vedisined arbennik e kêr : emañ an urjañsoù o vougañ en ospitalioù, lec'h ma ne baouezer ket da glask war-lerc'h labourerien ha gweleoù. Silet e vez an dud klañv hervez pegen grevus e seblant o stad bezañ, met ivez, hep diskouez hag hep lavar, hervez al lec'h m'emañ o chom ennañ hag ar moneiz o deus. Ar gwir d'ar yec'hed n'eo ket evit an holl ken.



- 】 Gennet eo ar servijoù etre re a dud klañv o tont ha re nebeut a labourerien.
- 】 Abaoe un dek vloaz bennak eo bet an niver a weleoù o tigreskiñ en ospital. « Plasoù » anvet medisinerezh war an deiz, a zo bet krouet en o lec'h.
- 】 Gant an urjañsoù peurgarget e teu ivez ur marc'had ampletus nevez, er gennad prevez : ar c'hreizennoù prederioù prim.

Dor an urjañsoù. Emañ gouloù an asagn o lugerniñ c'hoazh e-kreiz an noz, a-istribilh ouzh savadur bras-divent un ospital. Al lutig diwezhañ-se a glasker evit bezañ prederiet, pa vez klob kabinedoù an holl vedisined. Met nec'het eo ar glañvourien, alies, pa rankont mont di, rak aliesoc'h-aliesañ ne vez ket digor ar servijoù d'an holl ken, d'abardaez ha da noz. E-pad an hañv, da skouer.

REOLET AN URJAÑSOÙ DA NOZ EN 21 OSPITAL

Ar wech kentañ eo. 21 diouzh an 33 servij trummadoù ospital a zo e Breizh he femp departamant a vo reolet adalek ar miz Gouere-mañ. Adalek

6e30 goude merenn, betek 8 eur pe 8 eur hanter diouzh ar mintin. N'eo ket klob a dalvez reolet, met silet eo. Da lavaret eo : a-raok mont d'an ospital e ranko an dud pellgomz d'ar Samu gant an niverenn 15. Ganto e vo heñchet ar glañvourien hervez pegen mallus eo o stad. Ma vez grevus-tre, pe ma vez mall-buhez, e chom Servij red an trummadoù hag an advevaat (Smur) war evezh, noz ha deiz.

E Gwened¹, Ploermael², Lannuon³, Pondi⁴, Roazhon⁵, Sant-Maloù⁶, Dinan⁷, Vitre⁸, Felger⁹ ha Redon¹⁰ e chomo gwir ar reolenn-se evit tri miz da nebeutañ, betek ar 1añ a viz Here. E Sant-Brieg¹¹, Gwengamp¹² ha Pempoull e vo etre an 12 a viz Gouere hag ar 25 a viz Eost, nemet evit an

1] Diferad niv.2025/222 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù ospital Breizh Atlantik, d'ar 4 a viz Here 2025

2] Diferad niv.2025/144 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù ospital Breizh Ploërmel, d'ar 4 a viz Here 2025

3] Diferad niv.2025/207 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù ospital Lannuon-Trestel, d'ar 4 a viz Even 2025

4] Diferad niv.2025/140 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù ospital Kreiz Breizh, e lec'hienn ar C'herio, d'an 30 a viz Even 2025

5] Diferad niv.2025/214 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù ospital Roazhon, d'ar 4 a viz Here 2025

6] Diferad niv.2025/145 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù pennospital Rance-Emeraude, d'an 2 a viz Here 2025

7] Diferad niv.2025/145 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù pennospital Rance-Emeraude, d'an 2 a viz Here 2025

8] Diferad niv.2025/141 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù ospital Gwiltreg, d'ar 1añ a viz Here 2025


9] Diferad niv.2025/215 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù ospital Kreiz Breizh Felger, d'ar 1añ a viz Here 2025

10] Diferad niv.2025/216 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù pennospital etrekumunel Redon-Carentoir, d'ar 1añ a viz Here 2025

11] Diferad niv.2025/210 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù pennospital Sant-Brieg - Paimpol - Treger, 30 a viz Even 2025

12] Diferad niv.2025/224 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù pennospital Gwengamp, 30 a viz Here 2025

SERVIJOÙ AR YEC'HED E BREIZH |



Setu ur skouer
eus kumuniezh
kumunioù
Loudia.
Etrekwezhiat eo
ar gartenn-mañ ;
kit da welet
anezhañ www.splann.org

trummadou pediaterk ha ginekologek. E Landerne¹³, e vo etre an 11 a viz Gouere hag ar 24 a viz Eost, nemet e-pad dibenn-sizhun ar Fête du bruit. Unan-war-ugent servij a urjañsoù a vo reolet, neuze, en o zouez an holl servijoù e Aodoù-an-Arvor, Il-ha-Gwilen hag e Liger-Atlantel¹⁴. Ar wech kentañ eo e vez lakaet kement a ospitalioù da

vont en-dro gant ar reoliañ e Breizh. Met c'hwec'h miz¹⁵ a zo e veze reolet an urjañsoù e Lannuon, Gwitreg, Pondi hag en holl servijoù Liger-Atlantel dija. Gwir e oa tri miz a zo e Sant-Maloù hag e Dinan. Ha daou vloaz a zo, zoken, en ospital Karaez, lec'h ma vez silet ar glañvourien n'eo ket da noz nemetken, met e-pad an deiz ivez. Met ne vo ket

13] Diferad niv.2025/226 a denn da reolennoù berrbad e trummadou kreizenn ospital Landerne, nozvezhioù eus ar Gwener 11 a viz Here 2025 betek ar Yaou 7 a viz Eost 2025, hag en nozvezhioù eus al Lun 11 a viz Eost 2025 betek ar Sul 24 a viz Eost 2025, d'an 9 a viz Here 2025

14] « Astenn an doareoù reoliet da vont e-pad an noz d'an holl servijoù trummadou e Liger-Atlantel adalek ar Sul 13 a viz Ebrel 2025 », embannadur kelaouiñ Ajañs Rannvroel ar Yec'hed Liger Atlantel, d'an 10 a viz Ebrel 2025

15] An holl diferadoù a denn da reolennoù berrbad e trummadou, lec'hienn Ajañs Rannvroel ar yec'hed e Breizh, 3 a viz Here 2025, pajenn web aet e miz Here 2025

etre ar 17 hag ar 21añ a viz Gouere¹⁶, da vare... Gouel an Erer kozh.

Ospitalioù a vez lakaet tout da « zistro », reoù an Argoad dreist-holl : gant an diouer a vedisined an trummadoù enno, n'heller ket digeriñ ar servijoù dizehan, kuit dezho da vezañ peurgarget atav. Ospital Lannuon¹⁷ a rankfe goprañ war-dro c'hwezek medisin arbennik war an trummadoù. N'ez eus nemet nav anezho. Ospital Pondi¹⁸ a rankfe goprañ daouzek anezho. Mankout a ra an hanter, pe dost.

Ambroise le Floc'h a zo unan anezho. Medisin an trummadoù eo, penn e servij bremañ. Kontañ a ra deomp un nozvezh ma oa diouzh tro, e Miz Du 2023, ha ma oa bet taget gant ur c'hlañvour : « *En em gavet e oan en ur servij a oa dibaseet, leun-chouk. Diaes e oa tremen en trepas, rak goloet e oa gant kravazhioù, warno un tregont klañvour bennak o c'hortoz kaout ur gwele en un ospital abaoe daou zevezh pe ouzhpenn. Tud kozh a oa anezho, aet o skiant diganto evit lod, hag ar memes privezioù evit 30 den. Gouzout a ouien ne c'hellfen ket ober war-dro pep hini. Ha ranngalonus*

eo, rak en un nozvezh e weler dremm an dud-se o cheñch da vat. » Un nozvezh c'harv e oa, met unan « *gustum* » ivez.

E-pad vakañsoù-hañv ar vedisined, hag e-pad ar goañv, pa vez kleñved-red ar grip oc'h ober e reuz, e vez anv eus enkadenn an urjañsoù er mediaoù. Evit gwir, avat, ne baouez ket mui an enkadenn.

GORTOZ PELL, GORTOZ GWELL

E-doug dek vloaz eo kresket an amzer gortoz en urjañsoù a 45 munutenn¹⁹. Ouzhpenn 3 eurvezh e chome an hanter eus ar glañvourien eno e 2023. 3 eurvezh n'eo ket kalz a dra e-keñver an 8 eurvezh 30 gortoz²⁰, well-wazh, e trummadoù ar Gazeg Wenn e Brest e-pad an hañv 2024. 24 eurvezh pe ouzhpenn e oa chomet ur c'hant den kozh bennak eno, zoken. Er memes bloavezh, e trummadoù Lannuon, e oa ret d'an dud gortoz 8 eurvezh²¹ a-raok ma teufe unan bennak d'ober war o zro en ospital. E 2018 e oa 3 eurvezh nebeutoc'h.

Padal, n'eus ket amzer da goll : evit un nozvezh tremenet war ur c'hravazh en

16] Diferad niv.2025/142 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù ospital Karaez, d'ar 1añ a viz Here 2025

17] Diferad niv.2025/207 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù ospital Lannuon-Trestel, 30 a viz Even 2025

18] Diferad niv.2025/140 a denn da reolennoù berrbad e trummadoù pennospital Kreiz Breizh, e lec'hienn ar C'herio, 30 a viz Even 2025

19] « Urgences : la moitié des patients y restent plus de 3 heures en 2023, 45 minutes de plus qu'en 2013 », Enklask trummadoù 2023, Elvire Demoly, Thomas Deroyon, Renerezh an Enklask, ar Studioù, ar Priziañ hag ar Stadegoù, miz Meurzh 2025

20] « Mur de la honte » au CHU de Brest : « Ce ne sont pas des patients qui attendent sans manger », se défend la directrice », Aurélie Lagain, lec'hienn France bleu Breiz Izel, 27 a viz Eost 2024

21] « Rapport d'observations définitives – centre hospitalier de Lannion (département des Côtes-d'Armor) - exercices 2018 et suivants », Kambr-rannvro ar c'hontoù e Breizh, Meurzh 2024


urjañsoù e kresk ar riskl da vervel en ospital a gazi 40 % evit ar glañvourien en tu all da 75 bloaz, hervez an enklask *No Bed Night*²² kaset da benn gant enklaskerien eus ar Skoazell bu-blik – Ospitalioù Pariz (AP-HP), eus Ensavadur broadel ar yec'hed hag ar c'hlaskerezh skiantel (Inserm) hag eus Sorbonne Université, bet embannet e miz Du 2023.

Ouzhpenn gortoz en ospital e rank an dud dispenn hent, bezañ kaset a ospital da ospital a-wechoù, evel e Kreiz-Breizh. Abaoe miz Gouere 2023 eo reolet urjañsoù Karaez, noz ha deiz.

Al lodenn vrasañ eus ar glañvourien a vez aliet dezho gant ar Samu mont da ospitalioù Kemper (45 munut hent), Montroulez (50 munut), pe Vrest (1 eurvezh ha kard). Lod a vez kaset di-gant an ambulañs. « *Un den a anavezan en deus bet ur gwallzarvoud gwazhienn en empenn (AVC), ha n'eo ket bet posupl damantiñ anezhañ e Karaez. Ne oa ket disponup ar Smur (NGAS : servij red an trummadoù hag an advevaat) kennebeut, setu deuet eo ar bomperien da gerc'hat anezhañ ha kaset eo bet da Vrest. N'eo ket bet damantet buan a-walc'h ha dilerc'hioù a zo c'hoazh war e yec'hed* », a

DASPARZH AR C'HRITERIOÙ YEC'HED E BREIZH

Liammet eo dasparzh an ospitalioù hag al lec'hioù prevez gant feur ar baourentez. Eregwezhiat eo ar gartenn-mañ ; gallout a rit ivez gwelet ar feur mervel, ar c'hriñ-bev pe ar feur ganedigezh, da skouer. Kit da www.splann.org



22] « Étude « No Bed Night » : une nuit passée sur un brancard aux urgences augmente de près de 40 % le risque de mortalité hospitalière des patients âgés, qui passe de 11,1 % à 15,7 % », Kemennadenn d'ar gazetennerien, Assistance Publique – Hôpitaux de Paris, Ensavadur Broadel ar Yec'hed hag an Enklaskoù Mezegiezh, Skol-veur Sorbonne, miz Du 2023

zispleg Caroline Tromeur, ergotera-peutourez ha sekretourez sindikad CGT an ospital.

« *Bras-tre eo efedoù serriñ an trummaoù evit tud kreiz-Breizh. Darvoudoù grevus a zo bet kontet deomp a-dega-doù* », eme Hanna Charles, medisinez hollek e Karaez hag ezel eus komite difenn an ospital.

TUD 'ZO N'EZ EONT KET MUI DA GAOUT AR MEDISIN

Ret eo anzav n'eus ket kalz modoù all da gaout prederioù e bro Karaez, en Argoad dre vras hag en hanternoz Aodoù-an-Arvor. Diouer a vedisined a zo e kêr eno.

Tro-dro da Wengamp, Sant-Brieg, Pempoull, Lannuon eo izeloc'h an niver a vedisined hollek a 15 %, hag an niver a vedisined arbennik a 9 %, e-keñver keidenn ar rannvro. « *Diasoc'h eo d'an dud amañ dija, mankout a ra medisined evit ar pemdez, ha n'eo ket aes mont da gaout medisined arbennik. Meur a vedisin a zo aet war e leve, ha goude-se hon eus gwelet tud a zeue gant kleñvedoù a vije bet da vezañ damantet abretoc'h* », eme ivez Grégory Pansin, e penn trummadoù Pempoull. Uheloc'h eo ar feurioù paourentez ha mervel eget keidenn ar rannvro e broioù Karaez, Gwengamp ha Pempoull. Ouzhpenn da se eo koshoc'h an dud enno, ha muioc'h a gudennoù yec'hed o deus. Medisined an trummadoù ha labourerien eus an ospitalioù a gont deomp penaos lod eus ar glañvourien n'ez eont ket mui da gaout ar medisined.

Mont a reont war baouraat ivez, a gont Marie-Hélène Aleman-Trevidic, en ospital Pondi. « *Goude ar C'hovid peur-getket, hon eus gwelet e teue diwezhat kalz a labourerien-douar hag a dud kozh a gustum moustrañ war o foan.* »

« *Ha pa vefemp niverusoc'h, ni, medisined, ne cheñchfe ket kalz a draoù evit an ezhommoù trumm sur a-walc'h, rak da noz hag e-pad an dibenn-sizhun ne labouromp ket. Amañ n'eus ket a SOS Médecins, n'eus klinikenn ebet, ret eo deomp gellet mont d'an trummadoù war-eeun* », eme Hanna Charles evit pouezañ.

Gwall c'hortozet e oa e zonedigezh da Greiz-Breizh. Met evezhiek a-walc'h eo bet Yannick Neuder, ministr karget eus ar yec'hed hag an diraez d'ar prederioù, er gerioù en deus dibabet e Karaez, d'an 13 a viz Mezheven : « *Ar pal eo galloud, ar buanañ ar gwellañ 'm eus spi, a-raok miz Du, kinnig un diraez d'an trummadoù pemp devezh ar sizhun e Karaez.* » Reolet e vo ar mont d'an urjañsoù en diskar-amzer c'hoazh, da noz hag e-pad an dibennoù-sizhun, neuze.

Ur skoilh er gwir da vezañ prederiet eo ar reoliñ evit meur a hini. Ur respont eo e gwirionez d'ur gudenn ledanoc'h : medisined a-walc'h n'eus ket e kêr, se a zo kaoz eo rediet an dud da vont d'an trummadoù evit kleñvedoù n'int ket c'hoarvezet trumm. « *Ar galloudoù publik a ra gant ar reoliñ evel un diskoulm a zo gwelloc'h eget netra pa ranker plediñ gant kudenn demografek ar vedisined* » a lavare Ariane Bénard, renerezh

ospital Sant-Brieg²³ e miz Here 2023, e-pad ur c'huzul evezhiañ eus an ospital. E pep lec'h e Breizh e teu ar sistem-se da vezañ an hini boutin. Met penaos eo bet kollet kefridioù « gwir » an ur-jañsoù d'ar poent-se ?

AN URJAÑSOÙ O TONT DA SIKOUR AR VEDISINED FRANK

« N'eus ket pell 'zo em eus gwelet ur glañvourez a oa bet kaset gant he medisin hollek evit ur vurbuenn war he jod. N'on ket me dermatologour ! Re wir e vo ret lemel anezhi, met n'eo ket mallus e mod ebet », a gont ur medisin en ur-jañsoù ospital Roazhon. Ur skouer eo eus ar verrezegzh a zo war ar vedisined arbennik.

Ar vedisined o-unan a c'houzañv ar verrezegzh-se. « 10 vloaz a zo, p'hon oa ezhomm eus ur radio evit ur c'hlañavour, e c'hellemp kaout anezhañ dindan daou zevezh, eme Laure Fiquet, medisinez hollek a labour 20 km pell eus Roazhon. N'eo ket posupl ken bremañ, ret eo deomp kas anezho d'an trummadoù. Da skouer, evit ur bugel 10 vloaz a c'hellfe bezañ paket gant ar gwentl-mut, hir-spontus eo evit kaout un ekografiez,

« Gwelet hon eus tud a zeue gant kleñvedoù a vije bet da vezañ damantet abretoc'h. »

n'eo ket aesoc'h deomp eget d'ar glañvourien ».

En ospital Roazhon, etre 2019²⁴ ha 2023²⁵, eo kresket an niver a dud c'hour o tont d'an urjañsoù a 11 %. E rannvro Breizh en he fezh eo ar c'hresk a 4,9 % e-keñver ar bloavezh 2016. « Gant medisined an trummadoù e vez tapet an holl droioù noz ha dibennoù-sizhun ! », eme ar c'helenner Louis Soulat, penn ar servij Samu 35, Smur ha trummadoù tud c'hour en ospital Roazhon hag eil prezidant ar sindikad Samu Urgences de France. E 2022, evit gwir, ne oa nemet an hanter eus ar vedisined hollek²⁶ vreizhat a gemere perzh en troioù noz ha dibennoù-sizhun en tiez mezegel diouzh tro.

23] Protokol emvod kuzul-merañ pennospital Sant-Brieg, d'ar 25 a viz Here 2023

24] « Chiffres Clés 2019 », ospital Roazhon

25] « Chiffres clés 2023 », ospital Roazhon

26] Kaier ar c'hargoù rannvroel evit ar medesinerezh war an deiz, Ajañs rannvroel ar yec'hed e Breizh, 2024

« Sellet a reomp ouzh kement tra a c'hell arboellañ amzer labour. »

MANKOUT A RA MEDISINED REOLIÑ

Digemmañ bewech an dud gant ur blegenn vallus diouzh ar re a ranko kaout ali ur medisin etre 12 eurvezh ha daou zevezh war-lerc'h : sed aze an dra d'ober da gentañ evit ma 'z afe nebeutoc'h a dud d'an urjañsoù. Evit an dra-se e vez goulennet gant an dud pellgomz d'ar 15 : reoliñ evit degemer ar glañvourien gant plegennoù mallus nemetken en urjañsoù.

Met evit ar reoliñ ivez e ra diouer ar vedisined hollek kontant da vont : kresket eo an niver a c'halvoù d'ar 15 a 30 %²⁷ e Roazhon abaoe 2019²⁸, met e-pad ar mare-se n'eus nemet 144 medisin hollek a gemer perzh er reoliñ e Breizh, pa labour 3 032 medisin hollek er rannvro. Broudet e vezont da gemer perzh gant un digoll arc'hant : un digoll

a 100 €²⁹ kriz evit pep eurvezh reoliñ. Evit un nozvezh diouzh tro, eus 8 eur noz da 8 eur vintin en do 1.200 € a zigoll ur medisin reoliñ hollek.

Met n'eo ket a-walc'h an digolloù-se evit reiñ youl d'ar vedisined da

gemer perzh, ha peurgarget e vez ar 15 alies. Sañset eo skoazellerien veze-gel ar reoliñ da respont d'ar pellgomzadennoù ha da zigemmañ ar prederioù mallus diouzh ar re n'int ket evit kas an dud da vedisined an trummadou eus un tu, ha da vedisined hollek ar reoliñ eus an tu all. Met « *a-wechoù n'eus nemet ur medisin hollek enskrivet war an deiziataer evit ar reoliñ !* », eme trummadour ospital Roazhon.

« SKOURROÙ » E-LEC'H PEMP SERVIJ TRUMMADOÙ


Setu penaos e vez stambouc'het an urjañsoù gant an diouer a vedisined hollek : gennet eo ar servijoù etre re a dud klañv o tont ha re nebeut a labourerien, gant an efed e vefe klozet pemp servij urjañsoù da noz³⁰, tamm-ha-tamm met da vat. E-lec'h ar servijoù-se

27] « Chiffres clés 2023 », ospital Roazhon

28] « Chiffres Clés 2019 », ospital Roazhon

29] Kaier ar c'hargoù rannvroel evit ar medesinerezh war an deiz, Ajañs rannvroel ar yec'hed e Breizh, 2024

30] « Note d'information sur l'actualisation du PRS sur l'activité Aide Médicale Urgente (AMU) », Ajañs rannvroel ar yec'hed e Breizh, 10 a viz Meurzh 2025



e vo savet ur « skourr medisinerezh trumm »³¹ a vo digor daouzek eurvezh bemdez ha n'eo ket deiz ha noz ken. Gwir e vefe evit ur servij trummadoù en Il-ha-Gwilen : hini Gwitreg. Ar c'helenner Louis Soulat a lak da ziwall : « Gwitreg a zo a-bouez bras evit tud ar Mezven. D'ur poent bennak n'heller ket gouzañv an hed ken. » Ajañs rannvroel ar yec'hed a ro da

anavezout e vo savet ar « skourroù trummadoù » « tamm-ha-tamm » ha « ne vo graet nemet ma vo difraeoù pozitivel ha youlek gant gouarnerezh an diazeadur yec'hed hag e gendoniadur tiriadel ». D'an deiz a hiziv e c'hellfe tri servij urjañsoù³² mont da vezañ skourroù e Penn-ar-Bed, unan en Aodoù-an Arvor, ouzhpenn hini Gwitreg en Il-ha-Gwilen.

31] « Recommandation Antennes de Médecine d'Urgence », Samu urgence de France ha Kevredigezh Bro-C'hall ar medisinerezh prim, 14 a viz Genver 2024

32] Raktres yec'hed rannvroel adwelet, Ajañs rannvroel ar yec'hed e Breizh, 27 a viz Even 2025

PEDER C'HLINIKENN BREVEZ A VO KLOZ E-PAD AN HAÑV

Ar vedisined frank a labour e klinikennoù prevez, eus o zu, a c'hin o kemer perzh en troioù diouzh noz hag e-pad an dibennoù-sizhun. En ospital Roazhon, ar c'helenner Soulat a c'houlenn mizvezhioù a zo gant Ajañs rannvroel ar yec'hed (ARS) e vefe rediet ospitalioù prevez Sant-Gregor ha Saozon-Sevigneg da lakaat ur radiologour diouzh tro evit digreskiñ ar c'hementad a labour d'ober gant radiologourien an ospital publik. N'eo ket deuet a-benn evit poent. An ARS ha Vivalto n'o deus ket respontet d'hor goulennnoù war ar poent-se.

D'ar memes koulz, hervez an titouroù hon eus, ar strollad prevez a serro meur a glinikenn e miz Eost 2025 : 15 devezh klozañ e Brest hag e Pondi, ur sizhunvezh e Sant-Maloù. E Montroulez ivez, « *ar renerezh en deus divizet klozañ an holl servijoù e-pad an dibenn-sizhun* », eme unan eus hon ti-tourerien, en unan eus ar c'hlinikennoù, o chom dizanv. « *Met da viken e vo, ha n'eo ket evit an hañv nemetken. Pa c'houlennomp penaos e vo graet evit an urjañsoù e vez respontet deomp : kas an dud d'an ospital publik !* » Didier Lechien, prezidant kuzul evezhiañ an daou ospital, bodet hervez lezenn abaoe miz Genver 2024 hag aotrou maer Dinan, ne gompren ket an

diviz-se. Keuz en deus nompas bezañ bet titour ebet na gant an ARS, na gant ar glinikenn : « *Kelaouiñ ac'hanomp a vije bet an disterañ tra d'ober. Riskloù a zo e teufe muioc'h a dud d'an urjañsoù en ospital pa vo serret.* »

N'o deus ket respontet deomp nag an ARS na Vivalto, met Emmanuel de Geuser, rener pennañ Vivalto Santé a embann e strategiezh sklaer : « *Sellet a reomp ouzh kement tra a c'hell ar-boellañ amzer labour* », a lavare eñ d'ar gazetenn *Le Figaro*³³ d'an 9 a viz Mae 2025.

NEBEUTOC'H A WELEOÙ, MUIOC'H A BREDERIOÙ WAR AN DEIZ

Un doare all a-bouez pronet gant an ARS evit bihanaat an niver a dud en urjañsoù a zo « *merañ ar gweleoù gwelloc'h* »³⁴ evit ma 'z afe an dud maez aesoc'h a-benn kaout plasoù. Abaoe un dek vloaz bennak eo bet an niver a weleoù o tigeskiñ en ospital. « *Plasoù* » evit oberatadennoù buan, graet e korf un devezh, hep kousket en ospital, a zo bet krouet en o lec'h. Setu ar pezh a vez anvet medisinerezh, pe surjianerezh, war an deiz.

Setu penaos ez eus bet kollet 656 gwele en ospitalioù breton abaoe dek vloaz. Padal, 45.000 gwele eo a vije bet dav krouiñ ouzhpenn e medisinerezh hag e surjianerezh, etre 2020 ha 2024,

33] « Contraintes par les tarifs, les cliniques privées connaissent de premières défaillances », Marie Bartnik, *Le Figaro*, 9 a viz Mae 2025

34] « Note d'information sur l'actualisation du PRS sur l'activité Aide Médicale Urgente (AMU) », Ajañs rannvroel ar yec'hed e Breizh, 10 a viz Meurzh 2025




evit mont da heul koshañ ar boblañs, hervez Lez ar c'hontoù³⁵.

Un dra vat eo evit ar glañvourien ober muioc'h a draoù war an deiz, an holl vedisined ospital hon eus kejet outo a zo sur eus an dra-se. Met re vuan eo bet graet ar c'hemm, emezo, evel Cécile Vigneau, a oa penn ar servij lounezouriezh en ospital Roazhon betek 2023. « Ur fazi eo bet serriñ gweleoù kustum evit ober plasoù war an deiz ganto. Ar glañvourien a vez ospitalet da vat [a chom en ospital meur a devezh hag a nozvezh] a vez kalz grevusoc'h o stad ha setu m'eo kresket ar c'hementad a labour a-galz. »

Kozhañ a ra ar boblañs, gant meur a gleñved eo paket ar glañvourien en em gav en ospital, chom a reont pelloc'h, ha dont a ra ar gweleoù vak da vezañ rouesoc'h. Kreskiñ o niver a vefe d'ober, kentoc'h, hervez Cécile Vigneau : « Posteloù a resevomp m'eo skrivet enno : Emañ ar grip oc'h ober e reuz, ret eo deoc'h kas daou zen klañv maez bep eil devezh a-raok kreisteiz evit reiñ plas d'ar re en em gav en trumadoù. » Met pa chom hor c'hlañvourien 10 devezh well-wazh en hor gweleoù, kement-se n'eo ket posupl. Peotramant e teuint en-dro an devezh

35] « La réduction du nombre de lits à l'hôpital, entre stratégie et contraintes », danevell diwar-benn implij lezennoù arc'hantaouiñ ar surentez sokial 2024, Lez-varn ar C'hontrollerien, 2024

NIVER A WELEOÙ E LEC'HIOÙ PREVEZ E BREIZH HAG E LIGER-ATLANTEL E 2023



Source : Statistique annuelle des établissements de santé

war-lerc'h peogwir n'int ket bet prederiet mat a-walc'h.

KLAÑVOURIEN A CHOM EN OSPITAL PA NE C'HELLONT KET BEZAÑ DEGEMERET E LEC'H ALL

Evit lakaat ar glañvourien da vont kuit buanoc'h eus an ospital e vefe dav kavout frammoù ha tud evit prederiañ outo war-lerc'h. « *E pep lec'h hon devez kudennoù goude an ospital, ha gwashoc'h eo abaoe enkadenn ar C'hovid. Gweleoù a vez serret gant an diouer a goskor. Klañvdiourien n'eus ket a-walc'h anezho, servijoù skoazell er gêr kennebeut. Diaes eo bezañ eilet gant tud ar gennad mezegel-ha-sokial ivez. N'eus live ebet a ya en-dro war hon lerc'h, evit gwir* », a zispleg deomp

Ariane Bénard, renerez ospital Sant-Brieg.

Bras eo perzh an tiez prederioù mezegel hag azgouestaat (SMR) evit ober war-dro ar glañvourien hag addeskiñ dezho goude ma oant bet en ospital.

554 gwele a zo bet kollet en tiez-se e-pad an dek vloaz tremenet er gennad publik e Breizh. Hag e diazad bevañ ospitalioù Aodoù-an-Arvor e vank 37 gwele³⁶ evit tizhout keidenn ar rannvro.

E tiez ar re gozh evel e servijoù prederioù er gêr, n'eo ket bras a-walc'h an niver a blasoù evit degemer tud war an oad, pa vez keñveriet ouzh rakselloù an Insee : eus 26 % da 31 % e tremeno feur ar re ouzhpenn 60 vloaz e poblañs Breizh etre 2016³⁷

36] Raktres mezegiezh ha skoazell rannet 2023-2028, ospitalioù strollad ospitalioù an Arvor

37] « Tableau STATISS : Accueil des personnes âgées », Diskouezadegoù yec'hed savet gant al lec'hienn www.scoresante.org, pajenn bet gwelet e miz Du 2025

ha 2023³⁸, sañ-
set. « Kalz a weleoù
ijinouriezh hon eus,
e tachennoù arben-
nik ar medisinerezh.
Met frammoù etre an
ospital ha ti an dud a
vank deomp, pa n'o
deus ket ezhomm an
dud da gaout tekno-
logiezhioù uhel, met
da gaout tud evit
ober war o zro », eme

Damien Henry, medisin an trumma-
doù en Oriant.

UR MARC'HAD AMPLETUS : AR C'HREIZENNOÙ PREDERIOÙ PRIM

Gant an urjañsoù peurgarget e teu
ivez ur marc'had ampletus nevez, er
gennad prevez : ar c'hreizennoù pre-
derioù prim. Seurt kabinedoù, bet sa-
vet gant medisined frank, a vez kavet
abaoe enkadenn ar C'hovid e Breizh.
Prometiñ a reont d'an dud bezañ gwe-
let buan gant ur medisin evit an trum-
madoù pa n'eus ket mall-buhez.

Hag ouzhpenn prometiñ a reont : pa
ranker gortoz etre unan ha tri miz evit
kaout un emgav en ur greizenn lune-
rezh mezegel e meurgêr Roazhon,
Medalliance a ginnig un emgav a-raok
tri devezh, da skouer, hervez testeni ur
glañvourez bet aterset gant *Splann* !.
Ur « greskenn » ankenius en doa kavet
he medisin dezhi, hag erbedet en doa

« Lakaet e vez ar medisinerezh da varc'hadourezh. Ar re-se o deus kavet an doare. »

dezhi ober un ekografiezh ar buanañ
ar gwellañ. Teir sizhunvezh goude e
oa an emgav kentañ kinniget en ur
c'habined lunerezh mezegel. Gant
Medalliance e oa unan da gaout daou
zevezh war-lerc'h, da Yaou-Bask. Ne
oa nemet un dra ouzhpenn d'ober :
paeañ ur « *feur* » mont e-barzh a
12,50 €, ne vez ket restaolet gant ar
Surentez Sokial.

Un ezhomm a oa : er c'hreizennoù-se
e c'heller kaout ur medisin buan evit
trummadoù etre daou, ma vezer
prest da baeañ ur gwenneq bennak
ouzhpenn.

Met enno ne vez graet nemet obe-
roù mezegel buan hag ampletus. Ar
gazetenn *Le Canard enchaîné* en doa
dispaket d'ar 15 a viz Genver treme-
net penaos e c'hounezont moneiz
war ar reoliñ : goulenn a reont gant o
c'hlañvourien pellgomz d'ar 15 a-raok
ma rafent war o zro da noz, e-pad an
dibennoù-sizhun ha d'an devezhioù

38] Notenn kelaouiñ diwar-benn hizivaat an obererezh Plan Rannvroel yec'hed (PRS) evit ar
Skoazell Mezegiezh Urzhiet (AMU), Ajañs rannvroel yec'hed Breizh, d'an 10 a viz Meurzh 2025

vak. Gant se e c'hellont ober gant pri-zioù kresket, paeet gant ar Surentez Sokial. Ar c'hreizennoù a ya en-dro Sul-ouel-bemdez a lak un distremen war o frizioù a 14 € d'ar Sadorn goude merenn, d'ar Sul ha d'an devezhioù vak, hag a 30 € eus a Lun da Sul goude 8 eur noz.

« *O doareoù dezho a zo "one shot", pa stourmomp-ni evit kendalc'her ar prederioù : anavezout mat hor c'hlañvourien, heuliañ anezho, eme gant anken Laure Fiquet, medisinez hollek eus bro Roazhon. Strizh eo an niver a vedisined a vez stummet, setu ar muiañ a greizennoù a-seurt-se a vo digoret, an nebeutañ a dud yaouank a vo staliet e kabinedoù evit ober war-dro ar c'hudennoù yec'hed kemplezh.* »

Kreñvoc'h eo bet e fealded d'ar ser-vijoù publik, a-benn ar fin. « *Evel un hent-dall eo an urjañsoù evit an dud ne 'z eont ket mui da gaout ar medisin hag a vez paour-tre alies. Me a gav pouezus e vije medisined enno, ne vije ket ul lec'h dilezet anezhañ.* »

Da echuiñ, hervez lezenn e oa sañset seurt kreizennoù da zigeriñ en takadoù ma vank medisined enno. En arvor hag e kêr eo e vezont staliet evit gwir, lec'h ma c'hellont labourat stankoc'h. « *N'eus nemet ul lezenn a c'hello lakaat harz d'ar staliañ anezho* », eme David Le Goff, rener dileuriadur departamant Il-ha-Gwilen an ARS Bretagne. D'an 13 a viz Mae o deus votet ar senedou-rien, just a-walc'h, evit ur stignad³⁹ a sternio frankiz ar vedisined d'en em staliañ. Ennañ e kaver un diarbenn nevez-flamm : ar vedisined a zo staliet e takadoù stank dija az aio d'ober kuzuliadennoù e « *takadoù priorek* ». Ha d'an dra-se e responte sindikadoù hag aozadurioù dileuriañ ar vedisined frank, ospital, gopret, studierien war ar medisinerzh ha dilennidi lec'hel, e fin miz Meurzh⁴⁰ : « *Reoliñ ur vicher pa vez berregezh warni ne echuo ket ar verregezh !* ».

**Caroline Trouillet, Isabelle Jarjaille,
Raphaël da Silva**

39] « Installation des médecins, déserts médicaux... Le Sénat adopte la proposition de loi pour « améliorer l'accès aux soins dans les territoires », Romain David, Public sénat, 14 a viz Mae 2025
40] « Réguler la pénurie ne résoudra pas la pénurie ! », disklêriadur a-gevret gant sindikadoù hag aozadurioù dileuriad medisined frank, ospitalioù ha medisined gopret, studierien mezegezh, ha dilennidi lec'hel, Kuzul Broadel Urzh ar Vedisined, 26 a viz Meurzh 2025

AN OSPITALIOÙ PUBLIK A RA KOF MOAN... AR C'HLINIKENNOÙ A ZO DON O HINI

Ur reolenn arc'hantaouiñ nevez a oa bet lakaet d'an ospitalioù gant ar Stad e 2003 : ar prizioù hervez an ober (T2A). Abaoe neuze e vezont rediet da vezañ ampletus. Mont en-dro an embregerezhioù a oa hini ar gennad prevez dija, met distabilaet eo bet ar servijoù publik gantañ, rak rediet int da brederiañ pep hini, forzh pehini 'vefe ar priz. Ar c'hlinikennoù prevez, eus o zu, a c'hell dibab an oberoù paeet mat.



】 Un adreizh a-bouez eo bet hini ar « prizioù hervez an ober », lakaet e pleustr e 2003. Ur priz a vez roet da gement jestr mezegel, hag ar prize-se eo a vez paeet d'an ospital lec'h m'eo bet graet.

】 Met lod eus an oberoù mezegel n'int ket paeet mat, evel e tachenn ar c'hinekologiezh-amiegouriezh. N'eo ket ampletus an tiez-gwilioudiñ, neuze, hag un arguzenn eo evit klozañ anezho.

】 Tenn e vez ar c'hevezerezh a sav etre an ospitalioù hag ar c'hlinikennoù, lec'h ma vez graet an oberoù an ampletusañ.

Goulennet e vo gant an ospital bezañ ampletusoc'h », en doa lavaret François Bayrou e-kreiz miz Gouere. Prometet en doa neuze ne chomfe ket an ospital maez eus an arboelloù a oa d'ober gant ar budjed evit 2026. Daou viz abretoc'h o doa resevet renerien ha renerezed an ARSoù un notenn gant ar ministr kentañ diwar-benn « *efedusted ha berzh an tiez prederiañ* ». Anat eo al lizher : ret eo dispign nebeutoc'h. Ugent vloaz 'zo e vez kanet an ton-se d'an ospitalioù.

« TRAOU AMPLETUS »

Abaoe 2003 eo techet antiez prederiañ d'ober an « *traoù ampletus* » dreist-holl,


evit ober gant titl an enklask etnografek en doa graet Pierre-André Juven, sokiologour, karget a enklaskoù er CNRS. Embannet e oa bet gant ar gelaouenn *Anthropologie & Santé*¹ e 2018. Diouzh ar pennad-se eo bet tennet an diviz meneget a-us :

— « Renerez an arc'hant : Daoust hag e vez graet an oberatadennoù gwellañ ganeomp ivez ?

— Surjian : Un ospital publik eo hemañ, n'eus ket da choaz an oberatadennoù gwellañ, n'a ket mat ganeoc'h ?

— Renerez an arc'hant : Met c'hwi 'ra traoù ampletus ivez avelennoù, traoù e mod-se !

— Surjian : Un ospital publik eo, 'lâran deoc'h, n'hellomp ket oberata pa vez ampletus ha chom hep ober pa n'eo ket !



1] « Des trucs qui rapportent », ur studiadenn etnografikel war argerzhioù ar c'hospitaladur en ospitalioù publik, gant Pierre-André Juven. Antropologiezh ha yec'hed, 2018

ampletus ha chom hep ober pa n'eo ket.»

Abaoe lezenn an 18 a viz Kerzu 2003² a denn da arc'hantaouiñ ar surentez sokial eo cheñchet da vat an doare da arc'hantaouiñ an tiez yec'hed, publik ha prevez. Gant ar « *prizioù hervez an ober* » (« *tarification à l'activité* » pe T2A e galleg) e vezont meret bremañ. « *Poellekaat* » ar reizhiad yec'hed³ o rediañ an ospitalioù d'ober dibaboù evit gwellekaat o oberoù ha dispign nebeutoc'h : sed aze palioù ar sistem nevez. A-raok an adreizh-se e veze arc'hantet an ospitalioù publik gant ur sammad hollek bep bloaz. Jedet e veze ar sammad roet da bep ospital hervez an dispignoù a oa bet

graet gantañ ar bloavezh a-raok. Ma veze dispignet muioc'h gant renerezh un ospital d'ur bloavezh bennak e veze roet muioc'h dezhañ d'ar bloavezh goude, hervez ezhommoù preder an dud o chom tro-dro.

Ar prizioù hervez an ober o deus cheñchet ar sistem-se da vat : da bep ober mezegel ez eus ur priz, hag a vez cheñchet bep bloaz. Ar gounidoù-se a ra al lodenn vrasañ eus budjed an ospitalioù. Gwechall e resevent sammadoù arc'hant bet divizet gant ar Stad. « *Cheñchet eo an doare da soñjal : dibaboù strategel a ranker ober evit labourat*

muioç'h en un dachenn pe eben, peogwir e vezer paeet gwelloc'h evito », eme Daniel Bouffort, bet rener al lec'haveiñ e meur a ospital hag ezel eus ar strollad « *Le Monde d'après* », a zifenn an ospital publik e Sant-Maloù. Gounidoù a rank an ospitalioù publik ober abaoe ugent vloaz, neuze. Met ar pal-se ne c'hellont ket tizhout anezhañ, rak sañset int da reiñ diraez d'ar prederioù da bep hini, noz ha deiz, ha bezañ gouest d'ober an holl brederioù, pa vefent paeet mat pe get.

**« O kozhañ emañ
an dud,
chom a reont
pelloc'h
n'eo ket
ampletus »**

« *Ne raent nemet kaozeal eus taolennoù Excel hag eus ampletusted, evel ma vijemp bet en un embregerezh prevez, eme ur vaouez he deus roet he zesteni*


deomp, bet penn ur servij e pennospital Roazhon betek 2023, hag he deus divizet chom dizanv. Gwelet a raemp kuzulierien brevez ha publik a zeue da zisplegañ deomp penaos bezañ efedus. Lârout 'raent deomp : "a-raok e chome an dud 10 devezh well-wazh ha bremañ e chomont 11 devezh, n'eo ket mat", "ret a enselladennoù 'vez graet ganeoc'h", "re bell e vezont ganeoc'h". Ha da ziskouez danevelloù obererezh deomp, gant taolennoù Excel, ha liv ruz ha liv glas... »

Ar memes komzoù a vez klevet gant Fabrice Le Roux, dileuriad sindikad CGT pennospital Redon : « *Ret eo*

2] Lezenn niv. 2003-1199 an 18 a viz Kerzu 2003 diwar-benn arc'hantaouiñ ar surentez sokial evit 2004

3] « *Observations définitives, la tarification à l'activité* », Lez ar c'hontoù, 30 a viz Even 2023

NIVER A GANEDIGEZHIOÙ E TIEZ-GWILIOUDIÑ E BREIZH HAG E LIGER-ATLANTEL E 2023



Source : [Données statistiques publiques en santé et social](#)

Etregwezhiat eo ar gartenn-mañ. Kit da www.splann.org

kodifiañ pep tra : tennañ gwad, gwiriañ an derzhienn, hag all, hag all. Bep bloaz e cheñch ar prizioù ha war zigresk int aet e-pad bloavezhioù : n'eus tu ebet d'en em dennañ. Evit kaout ar memes gounidoù e ranker ober muioc'h atav. Ouzhpenn da se e vez an dud o kozhañ e Redon, chom a reont pelloc'h en ospital, n'eo ket ampletus. » An niver a dud oadet a 0 da 44 bloaz a ya war zigresk abaoe

2011, pa gresk niver an dud ouzhpenn 60 vloaz, rummad ar « baby-boom », hervez ur vammenn. Ur boblañs o kozhañ a dalvez muioc'h a brederioù d'ober, muioc'h a dud dalc'het hag a dud gant meur a gleñved. Feur ar ganedigezhioù a ya war zigresk, ha tachenn ar c'hinekologiezh-amiegouriezh a vez

« Ur poent askorusted da 1.200 gwilioud bep bloaz. »

paet fall-tre gant ar prizioù hervez an ober. Setu penaos e ya an tiez-gwilioudiñ da goust moneiz d'an ospitalioù. Da ziwall a oa ouzh stad an arc'hant e pennospital Dinan, a skrive kambr Breizh ar c'hontoù e miz Genver 2019. An ti-gwilioudiñ a oa kaoz, rak digreskiñ a rae an niver a c'hanedigezhioù dizehan : 990 a oa bet e 2010, met 680 e 2017⁴.

« Lavaret e oa bet deomp ne vije ket klozet an ti-gwilioudiñ, eme Erwan Beaudoin, dilennad an tu-enep e Dinan. Hag e 2020 e oa bet klozet ! » Reizh e oa hen ober, hervez kambr Breizh ar c'hontoù, rak digresket eo an niver a c'hanedigezhioù a 8,5 % en tiriad-se abaoe 2014. Ouzh tiez-gwilioudiñ Felger⁵ ha

4] « Naissances. Gros coup de mou en 2011 », Le Télégramme, 30 a viz Kerzu 2011

5] « Rapport d'observations définitives et sa réponse, centre hospitalier de Fougères, exercices 2017 et suivants », Kambr rannvroel kontoù Breizh

Gwitreg⁶ (e 2022 ha 2023) en deus sellet kambr ar c'hontoù ivez, rak enno ne vez ket tizhet « *ar poent askorusted ofisiel bet lakaet da 1200 gwilioud bep bloaz* » gant minis-trevezh ar yec'hed, a skrive an ensavadur. Daoust da se « *n'emañ ket an ti-gwilioudiñ en arvar e mod ebet !* » e Felger, en deus respontet deomp David Chambon, rener pennospital Felger. Evit gwir eo renet e servij mammelezh gant penn servij ar c'hinekologiezh-amiegou-riezh e pennospital skol-veur Roazhon bremañ. An daou skipailh mezegel a zo bet lakaet boutin, neuze, hag e mod-se e c'hell ar maouezed brazez o devezh kudennoù yec'hed bezañ damantet e Felger, kentoc'h eget bezañ kaset da bennospital Roazhon bewech. « *Matre eo an disoc'hoù hon eus, ha gant se eo solutoc'h ar servij publik-mañ hag a vern kalz deomp* », eme zDavid Chambon.

KLOZET TIEZ-GWILIOUDIÑ PREVEZ

Nebeutoc'h a wilioudoù, diouer a vedisined, met ivez prizioù re izel jestroù ar c'hinekologiezh amiegou-riezh er prizioù hervez an ober : sed

« Dibaboù strategel a ranker ober evit labourat muioc'h en un dachenn pe eben. »

aze kudennoù an tiez-gwilioudiñ publik kement ha prevez. Savet e oa Lez ar c'hontoù⁷ a-enep d'ar prizioù-se : e 2023 e skrive e oa « *techet an tiez-yec'hed d'ober ar prederioù o deus splot warno dreist-holl* » hag « *an amiegou-riezh eo an dachenn m'he deus an dilañs brasañ ar gennad publik enni* ». « *Un euzhvil n'hell ket bezañ meret ken* »⁸ eo deuet « an T2A » da vezañ, a skrive an ensavadur neuze, ha me-negiñ a rae an diforc'h a oa etre koust gwir ar jestroù hag ar prizioù anezho. Bep bloaz e kresk an diforc'h-se, emezo, rak bep bloaz e vez izelaet ar prizioù evit digreskiñ an dispignoù foran war ar yec'hed. Tabutet e veze

6] « Rapport d'observations définitives et sa réponse, centre hospitalier de Vitré, exercices 2016 et suivants », Kambr rannvroel kontoù Breizh, 2022

7] « Observations définitives, la tarification à l'activité », Lez ar c'hontoù, 30 a viz Even 2023

8] « Observations définitives, la tarification à l'activité », Lez ar c'hontoù, 30 a viziz Even 2023

« An T2A, un euzhvil n'hell ket bezañ meret ken. »

ar mod-se da arc'hantaouiñ ar yec'hed gant Penn-ensellerezh an aferioù sokial⁹ ha gant ar Sened¹⁰ e 2024, rak gantañ e vez techet ar gennad prevez da serriñ tiez-gwilioudiñ.

« Ur medisin en deus kavet gwelloc'h mont d'ur glinikenn ma n'eus ket a di-gwilioudiñ enni da labourat, eme ur medisin a labour en ur glinikenn brevez e Breizh. Evit bezañ diouzh tro e-pad 24 eurvezh en devezh un anesteziour un digoll a 230 € kriz. Ur peridural a vez paeet 240 € kriz. Met nebeutoc'h a c'hanedigezhioù a zo. Ma ne ra ar medisin anesteziour nemet ur peridural pa vez diouzh tro, n'eo ket paeet mat a-walc'h. » 19,5 € kriz evit un eurvezh labour e vo paeet an anesteziour e-pad e 24 eurvezh diouzh tro ma ne vez nemet ur c'hane-digezh. *« Paeet fall-tre eo an amiegou-riezh, setu perak e chom a-sav ar gennad*

prevez gantañ ivez », eme zDaniel Bouffort. Evit gwir emañ ar strollad Vivalto, a zo e sez en Il-ha-Gwilen, o paouez embann e vo serret un ti-gwilioudiñ ganto e Boulogne-sur-Mer. « Diouzh an 10 ti-gwilioudiñ hon eus, sur ne chomo digor

nemet 6 » en doa lavaret Daniel Caille, prezidant pennrener ar strollad, di-rak ar Sened¹¹ e miz Mezheven 2024. Goulennet hon eus ouzh ar strollad Vivalto hag e vefe serret hini pennos-pital prevez Sant-Gregor, e-kichen Roazhon. Respontet o deus : an ti-gwilioudiñ, « *labelaet "Ospital Mignon d'ar Babigoù", a zo bet modernaet da vat gant digoradur ar pol nevez "Le Cocon" e miz Mezheven 2025. N'eus ket anv da serriñ an ti-gwilioudiñ-se evit poent ».*

Ur strollad prevez all eo Hospi Grand Ouest. Emañ e penn daouzek ti-prederiañ e Breizh, hag heñvel eo an traoù eus o zu. War var emañ unan eus o ziez-gwilioudiñ, hini klinikenn Plerin en Aodoù-an-Arvor. Aet eo kuit meur a bediatur, ha pennoù ar glinikenn o deus ranket goprañ medisined etretant evit labourat diouzh tro. 300.000 €¹² a

9] « Éthique et TAA, webinaire », ATIH, ajañs teknikel titouriñ war an ospitalaat, 21 a viz Meurzh 2023


10] « Financiarisation de l'offre de soins : une OPA sur la santé ? », danevelloù kelaouiñ niv. 776 (2023-2024), 25 a viz Gwengolo 2024

11] « Financiarisation de l'offre de soins : une OPA sur la santé ? », danevelloù kelaouiñ niv. 776 (2023-2024), 25 a viz Gwengolo 2024

12] « Pour maintenir sa maternité, la clinique de Plérin a reçu 300 000 € d'aide publique versée par l'ARS », Tanguy Homery, Ouest-France, 20 a viz C'hwevrer 2025



Achille Ménéard



zo bet roet d'ar glinikenn gant Ajañs rannvroel ar yec'hed evit arc'han-taouiñ an dreistkoust-se. 2.500 € a c'helle bezañ koust un dro 24 eurvezh, hervez ur vammenn en ur sindikad. En ospital Sant-Brieg, an hini tostañ, emeur o klask bezañ prest da zegemer ar merc'hed na c'hellint ket mont d'ar glinikenn ken, gant « *astenn ar salioù gwilioudiñ betek 1.000 ganedigezh* » eme Régis Delaunay, prezidant bodad mezegiezh ospital Sant-Brieg. « *N'eo ket sklaeroc'h deomp eget da dud ar vro, n'eus ket bet*

« Ne vo dilezet den ebet ha hervez ar pezh a vo graet gant ar gennad prevez e raimp-ni. »


divizet netra, met ret eo bezañ prest da bep tra, ar stad zo bremañ pe klozañ ti-gwilioudiñ Plerin. Hor perzh a servij pu-

blik a zalc'himp dezhañ forzh penaos, ne vo dilezet den ebet ha hervez ar pezh a vo graet gant ar gennad prevez e raimp-ni. »

Emvod-meur ar strolad Hospi Grand

Ouest, perc'henn klinikenn Plerin, a voe aozet e miz Mezheven paseet. Ur vammenn en ur sindikad, a gemeras perzh en emvod-meur, en deus graet un diverradenn eus an eskemoù diwar-benn an tiez-gwilioudiñ

PEGEN PELL E PAD EVIT MONT BETEK UN TI-GWILIUDIÑ E BREIZH ?



Ur skouer evit gouzout penaos lenn ar gartenn-mañ : e 2020 annezidi bro Pempoull a lakae etre 10 hag 20 mn evit mont d'an ti-gwilioudiñ tostañ. E 2023 e oa kresket an amzer-se etre 30 ha 50 munutenn. Etregwezhiat eo ar gartenn-mañ : kit da welet www.splann.org

evidomp. « Nebeutoc'h a vugale a vez ganet. Ma vo nebeutoc'h-nebeutañ a c'hanedigezhioù e paouezimp gant ar gwilioudiñ hag an ospitalioù publik a ray war-dro an dra-se lec'h ma vo posupl dezho. »

MAGET EO AR GENNAD PREVEZ GANT AN DIOUER A BREDERIO EN OSPITALIOÙ PUBLIK

Ouzhpenn tachenn ar c'hinekologiezh

a zo. « Reizhiad ar prizioù hervez an ober en deus degaset lojik an arc'hant ha gant se eo deuet aesoc'h d'an ospitalioù prevez kreskiñ, muioc'h eget an ospitalioù publik, eme bPierre Gillouet, dilennad e Moñforzh. Peogwir ne 'z ae ket en-dro an ospital publik gant lojik an arc'hant ha peogwir n'eus ket kement a redioù er gennad prevez. »

Betek 2003 e oa pal an ospitalioù publik reiñ ur servij publik ha respont da



Raktres astenn klinikenn an Emeraude

ezhommou yec'hed ar boblañs, forzh peseurt hini 'vefe ar c'houst. Ar genad prevez, er c'hontrol, a yae en-drogant palioù askorusted dija, ha jestroù mezegel paeet mat a veze graet ennañ dreist-holl. Ha setu an dalc'h : bremañ ma vez arc'hantaouet an ospitalioù publik hervez an ober ez en em gavont gant ar memes gounidoù hag ar re brevez, met perzh ur servij publik o devez c'hoazh. Muioc'h a heligentañ a zo etre an ospitalioù publik ha prevez, neuze, rak kreskiñ a glaskont tout ober evit ma kreskfe o gounidoù.

« Emañ Vivalto o tigeriñ gweleoù medisinerezh e Sant-Maloù pa vezont serret e Dinan, eme zDaniel Bouffort, bet renner al lec'haveiñ en ospitalioù hag ezel

eus ar strollad « Le Monde d'après », a zifenn an ospital publik e Sant-Maloù. *Hag en ospital emaint en soñj serriñ gweleoù, padal e vez peurgarget bep bloaz pa vez mare ar c'hleñvedoù-red. N'eus netra a-boell ganto ! »*

Er strollad ospitalioù¹³ Renk Emrodezh e vez bodet ospitalioù Sant-Maloù ha Dinan. Ennañ e vo serret eizh gwele ospitalañ e servij ar surjianerezh, ur gwele e servij an amiegouriezh, 37 gwele en trummadoù, 10 gwele ospital deiz e psikiatriezh evit an dud c'hour, ha pevar gwele e psikiatriezh evit ar vugale, sañset, adalek 2027. Hage-pad ar mare-se emañ tud Vivalto o sevel un dachenn labourerezh yec'hed 4.000 m² e Sant-Maloù, hag o

13] « Projet Médico Soignant Partagé du Groupement Hospitalier Rance Émeraude à l'horizon 2027 »

EXTENSION CLINIQUE
 3 niveaux pour une surface de 4 000 m²
 Ouverture : Décembre 2026
 Coût de l'opération : 14 M€
 financée par Vivalto Santé

Service de Médecine

- 12 lits d'Oncologie
- 24 lits de médecine polyvalente : Gériatrie, Plaies, Douleur chronique
- Agrandissement de l'HDJ : Diabète, Onco, Douleur...

SOINS MEDICAUX DE READAPTATION - SMR
 (dans l'espoir d'une validation ARS)

- 15 lits de SMR oncologique
- 15 lits de SMR gériatrique
- 10 places d'Hôpital de Jour (onco et gériatrie)
- Plateaux de rééducation et restaurant
- Patio central avec Jardin thérapeutique

Chirurgie ambulatoire

- Doublement des capacités du service et agrandissement du bloc opératoire
- Intégration partielle du service dans le bloc opératoire : salon d'entrées et boxes de surveillance pour la chirurgie de courte durée (cataracte et chirurgie de la main)

Munudoù astenn klinikenn an Emerald

c'hlinikenn, hini Aod an Emrodez, a vo brasaet a-benn fin ar bloavezh 2026.

« Gwanaet eo plas an daou bennospital publik etre 2016 ha 2019, ha kreñvaet hini klinikenn Aod an Emrodez, klinikenn Sant-Gregor ha liesklinikenn Sant-Laorañs (Roazhon). » Setu ar pezh a c'heller lenn e raktres ar strollad ospitalioù evit ar bloavezhioù da zont.

Pa vez klozet ur servij en ospital publik e teu buan an embregerezhioù prevez war ar marc'had. En Il-ha-Gwilen e voe klozet servij prederioù mezegel hag azgouestaat (SMR) ospital Breselien e 2022. Gantañ e c'helle ar glañvourien kaout prederioù hag azgouestaat goude un oberatadenn pe ur gwallzarvoud, nepell eus ar gêr.

Padal en doa prometet an ARS¹⁴ d'ar

servij ospital e rofe « skoazell dezhañ [...] evit ma vefe stabilaet an obererezh ».

Les Hôpitaux Privés Rennais, isembregerezh d'ar strollad prevez Vivalto, a zo bet aotreet gant an ARS da zigeriñ ur servij prederioù hag azgouestaat tri bloaz war-lerc'h. « An embregerezhioù prevez a glask bezañ aotreet da vont e-barzh tachennoù barregezh ma ne vez ket postet kalz arc'hant enno gant ar yec'hed publik, a gav d'unan eus hor mammennoù en embregerezh. Ma 'z eont war an dachenn-se, sur eo askorus dezho. »

OBERATA WAR AN DEIZ, AN AOUR WAR AR RADEN GANT AR C'HKLINIKENNOÙ

Ar gennad prevez en deus postet arc'hant evit diorren an oberata war

14] « Contrat hospitalier de territoire : l'ARS Bretagne et le groupement hospitalier Haute-Bretagne renouvellent et étendent leur engagement », kemennadenn d'ar gazetennerien, ajañs rannvroel ar yec'hed e Breizh, 27 a viz Meurzh 2023

an deiz, evit galloud oberata klañvou-rien hep na chomfent da gousket en ospital. « *E tiez-yec'hed prevez e vez graet al lodenn vrasañ eus ar chomadennoù war an deiz (61,4 %)* », en doa merzhed Lez ar c'hontoù e 2023. Askorus eo : programmet eo an oberata, hep rouestlad ebet sañset, ha ne gousk ket ar c'hlañvour en ti. Oberatadennoù a bep seurt a vez graet e mod-se, evel surjianerezh al lagad, lemel un tumor en ur vronn pe en uterus, surjianerezh ar glin, hag all.

Ariane Bénard, renerez pennospital Sant-Brieg, a lavar ivez e vez tenn ar c'hevezerezh etrezo ha klinikenn Plerin, a zo perc'henn ar strollad Hospi Grand-Ouest warni : « *Anat eo hon eus kollet rannoù marc'had gant klinikenn Plerin, an holl ac'hanomp [NGAS : ospitalioù strollad ospitalioù an Arvor : Sant-Brieg, Pempoull, Gwengamp, Lannuon]. Eno eo e vez graet ar muiañ a surjianerezh.* » 50 % eus ar surjianerezh¹⁵ war an deiz a vez graet enni en takad, ha 16 % nemetken en ospital Sant-Brieg. « *Kustum eo ar vedisined frank da gas o c'hlañvourien d'ar c'hlinikennoù* », eme Younes Boulahia, surjian en ospital Gwengamp. Ha da reiñ ar skouer-se : « *Da glinikenn Plerin e oa bet kaset unan eus ma c'hlañvourien, evit ma vefe oberataet kanol an arzorn dezhañ. Met ne c'helle ket paeañ evit ar prizioù ouzhpenn a vez lakaet gant ar glinikenn. Nec'het e*

oa e ouife e vedisin e oa deuet da gaout ac'hanomp zoken. » Kenouestlet gennad 2 eo al lodenn vrasañ eus surjianed ar glinikenn, ar pezh a dalvez e vez choazet o frizioù ganto o-unan. An Asurañs kleñved ne zaskoro ket d'ar c'hlañvour muioc'h eget priz ar gennad 1. Ar peurrest a vo dezhañ da baeañ, neuze, ma n'en deus ket a genwarez.

« *Itrikoù* » niverus a zo evit gwellekaat ar gounidoù, en deus kontet deomp ur vammenn en ur strollad prevez a zo perc'henn war meur a glinikenn e Breizh. « *Lakaat a reont an dud da baeañ evit ur gambr pa 'z int chomet war-sav e-barzh e-pad 30 munut. Memes mod e soñjont atav : ma koust ur jestr 60 euro, ha ma c'heller facturenniñ anezhañ da 80 euro, d'al live ma vo daskoret d'ar c'hlañvour gant e genwarez, n'eus ket gwelloc'h !* » Gall a reer soñjal ne cheñch netra ar prizioù kresket-se evit ar glañvourien, da gentañ. Met e gwirionez, ma kav d'ar strolladoù kenwarez e koust muioc'h ar prederioù da zaskor, e vo kempouezet ganto o kreskiñ skodennoù ar glañvourien.

Ar gennad prevez en deus an T2A met n'en deus ket redioù ar servijoù publik. Ar marc'h hag an arc'hant o deus, neuze : 92 % eus o arc'hant a zeu eus ar surentez sokial dre ar prizioù hervez an ober, met ne vezont ket rediet d'ober prederioù noz-deiz.

15] « Part d'activité en chirurgie ambulatoire sur la zone d'attractivité en 2023 », lec'hienn web Hospidiag, pajenn web bet gwelet e miz Du 2025

En em savet e oa ar gennad prevez betek gervel¹⁶ ar vedisined frank da herzel da labourat e miz Mezheven 2024. A-benn ar fin en deus emban-
net ar gouarnamant e vefe kresket ar prizioù¹⁷ a 0,5 %, hep na vefe lakaet redioù ouzhpenn dezho, evit ar gennad prevez evel ar gennad publik.

Gant se e c'hell ar c'hlinikennoù klask goprañ labourerien an ospitalioù publik o kinnig goprou hag aozioù labour kalz gwelloc'h dezho. Deskrivet eo e lodenn ziwezhañ hon enklask.


**Isabelle Jarjaille, Caroline Trouillet,
Raphaël da Silva**

16] « Rennes : les hôpitaux privés de Saint-Grégoire et Cesson-Sévigné annulent leur mouvement de grève », Clémence Pays, Actu.fr, 12 a viz Ebrel 2024

17] « Le gouvernement annonce une augmentation du financement des établissements de santé en 2025 », communiqué de presse, ministère de la Santé, 15 a viz Meurzh 2025

ISLONIK AR C'HOLLVEZHIOÙ, DAÑJER AR SAVADURIOÙ : OSPITALIOÙ EN ARGOLL

Rivinet e vez ospitalioù publik Breizh gant ar prizioù hervez an ober. Re izel eo deuet o gounidoù da vezañ evit gellout postañ arc'hant. O koshaat emañ ar savadurioù a vloaz da vloaz, avat, ha gortoz a reer ar sikourioù bet prometet evit adneveziñ anezho. Raktresoù 'zo n'int ket kroget c'hoazh 15 vloaz goude bezañ bet asantet, hag an ospitalioù ne c'hellont ket gwellaat degemer an dud klañv.




- A-gaoz d'un diouer a arc'hant, savadurioù an ospitalioù breizh a ya o stad war washaat buan, ha surentez an implijourien gantañ.
- An ARS a ali d'an ospitalioù degemer muioc'h a glañvourien, neuze, evit kaout gounidoù brasoc'h padal n'eus ket a savadurioù reizh evit hen ober.
- Serret e vez gweleoù ivez evit espern arc'hant evit ober e plas surjianerezh war an deiz a vez. ar pezh a gresk c'hoazh kolloù. Ha servij publik ar yec'hed a ya war washaat.

Ugent vloaz 'zo ne oa ket bet ken uhel kollvezhioù an ospitalioù publik, betek 2,5 %¹ eus o gounidoù e oa e 2024.

Met gwareziñ anezho e budjed 2026 ne oa ket ar gouarnamant en soñj ober. Goulennet e vez gant an ospitalioù bezañ efedusoc'h² atav, gant nebeutoc'h a arc'hant. D'an deiz a hiziv avat, emañ eizh ospital eus Breizh o c'hor-toz bezañ adframmet³ 1,1 miliard a euroioù a ranko bezañ postet enno evit kement-se.

Ajañs rannvroel ar yec'hed a embann sammadoù arc'hant tammig-ha-tammig. E Gwengamp he deus roet hec'h asant d'ur steuñv arc'hantaouiñ a 101 milion a euroioù⁴ d'ar 27 a viz Mezheven 2025. An hanter eus ar sammad a ranko bezañ amprestet gant an ospital, an hanter all a vo pourvezet gant an ARS ha departamant Aodoù-an-Arvor. Sañset eo arc'hantaouet an nevesaat, neuze. Met e gwirionez, penaos e ray ospitalioù o devez kollvezhioù bep bloaz evit amprestañ ha

RAKTRESOÙ O SEVEL



Disoc'h ar foñs arc'hantaouiñ rannvroel 2024. Teul tennet eus ar c'hendalc'h rannvroel war ar yec'hed hag an emrenerezh CTS, d'ar 16 a viz Mae 2025.

- 1] « La dégradation des comptes financiers des hôpitaux publics se poursuit en 2024 », Studioù ha disoc'hoù, Renerezh an enklask, ar studiadennoù, ar priziañ hag ar stadegoù, miz Gouere 2025
- 2] « Circulaire relative à l'efficience et à la performance des établissements de santé », notenn gant ar C'hentañ ministr, 23 a viz Ebrel 2025
- 3] « Bilan FIR 2024, webinaire CRSA CTS », kuzuliadeg rannvroel ar yec'hed hag an emrenerezh CTS, d'ar 16 a viz Mae 2025
- 4] « Nouvel hôpital de Guingamp : un projet à plus de 100 millions d'euros validé et soutenu financièrement par l'ARS Bretagne », kemennadenn d'ar gazetennerien, ajañs rannvroel ar yec'hed e Breizh, 27 a viz Even 2025

postañ arc'hant ? Mallus eo deuet an traoù da vezañ, avat.

**SAVADURIOÙ NE BLEGONT KET
OUZH AR REOLENNOÙ
SURENTEZ
EVIT AN TANIOÙ-GWALL**

Un « *ali enep evit ar surentez tan-gwall* » en deus unan eus savadurioù ar surjianerezh en ospital skol-veur Roazhon. Komzomp sklaeroc'h : arabat degemer tud ennañ, rak ne bled ket ouzh ar reolennoù surentez ma vo un tan-gwall. E Redon « *e rankomp goloñ prenestroù ar c'hor-naoueg gant liñselioù pa vez avel, kar mod all e teu e-barzh* », he deus kon-tet ul labourerez deomp.

Ha tommañ savadurioù kozh a goust ker : 1 milion a euroioù bep bloaz, well-wazh, a gav d'ar renerezh. Hag amañ evel e Roazhon e rankfe lod eus ar savadurioù bezañ klozet abalamour d'ar surentez tan-gwall. C'hwec'h vloaz 'zo e rankfe ar savadurioù ma kousk ar glañvourien ospitalaet enno bezañ serret. Ur strollad seizh den arbennik war ar surentez a vez paeet gant an ospital evit chom noz-deiz war al lec'h ha delc'her ar savadur digor, neuze. 800.000 € e koust bep bloaz.

E-kreiz ar vro emañ pennospital Breselien. E-pad kuzul evezhiañ miz Here 2024⁵ e lavare ur vedisinez eno : « *Ne c'hellimp ket gortoz meur a vloavezh er stad m'emañ ar savadurioù : ur gwir riskl a zo e vije torret ar c'horvoñ* [NGAS :

« **Degeme a
reomp tud e
kambroù
doubl evit
echuiñ o
buhez. »**

da lavaret eo rankout serriñ ar savadurioù]. A-bouez-kenañ eo mont war-raok buan war an dachenn-se. » A-du e save ur glañvdiourez ivez : « 13 bloaz 'zo e klevan lavaret e vefe adsavet an ospital e Sant-Meven [...] ha ne c'hoarvez netra. E-pad ar mare-se e tegemeromp tud e kambroù doubl evit echuiñ o buhez, an aozioù labour ha herberc'hiañ a ya war washaat. Padal eo dieub an dachenn ha perc'henn eo an ospital warni dija. »

**KEVEZEREZH ETRE AR
PENNOSPITALIOÙ
EVIT BEZAÑ ARC'HANTAOUET**

Nevesaet e rank ospitalioù Breizh bezañ, adsavet evit lod anezho zoken. A-du emañ pep hini war an dra-se. Prest eo ar raktresoù abaoe ouzhpenn dek vloaz evit al lodenn vrasañ anezho, met n'eus nemet Redon ha Gwengamp

5] Danevell ar c'huzul evezhiañ, pennospital Breselien, d'an 10 a viz Here 2024

Penaos am- prestañ pa oa 4 milion a gollvezhioù e fin ar bloavezh 2024, muioc'h c'hoazh evit a-roak ?

a zo bet gwiriekaet an arc'hantaouiñ anezho e 2025.

E Redon en deus prometet an ARS e vefe roet 30 milion a euroioù⁶ d'an ospital evit sevel un eil savadur ospitalañ a-raok 2028. « *Hervez barregezh an ospital da gavout an arc'hant e vo graet an eil hag an trede prantad [adframmañ al leurenn deknikel hag ar salioù lec'ha-veiñ]* », eme vMathilde Hignet, kannadez II-ha-Gwilen La France Insoumise, ezeleus eus ar c'huzul evezhiañ. « *Diaes eo soñjal e c'hello ar pennospital*

arc'hantaouiñ ar prantadoù-se, pa ouzer pegen diaes eo stad an arc'hant gantañ. » Penaos am-prestañ pa oa 4 milion⁷ a gollvezhioù e fin ar bloavezh 2024, muioc'h c'hoazh eget e 2023, pa oa 3,5 milion⁸ ?

Gant Ajañs rannvroel ar yec'hed e vez arc'hantaouet al labourioù e Redon hag e Gwengamp. Anken a zo en ospitalioù all, neuze, ne chomfe gweneg ebet evito. Meneget eo bet gant an ARS⁹ e kuzul evezhiañ ospital Redon e teufe an


30 milion a euroioù a vez roet d'an ospital eus ar Font emellout rannvroel, ur sammad arc'hant (254,2 milion a euroioù e 2024) a vez roet da Ajañs rannvroel ar yec'hed gant ministrezh ar yec'hed bep bloaz. Servijout a ra da arc'hantaouiñ mont en-dro an tiez yec'hed, met ivez an holl bolitikezhioù yec'hed er rannvro. Nec'het eo an dud en ospitalioù all ne vije ket eus an arc'hant a zo bet prometet dezho ma ne vez ket asantet o raktresoù a-raok fin ar bloaz 2025, rak sur

6] Danevell ar c'huzul evezhiañ, pennospital etrekumunel Redon-Carentoir, d'ar 17 a viz Kerzu 2024

7] Danevell ar c'huzul evezhiañ, pennospital etrekumunel Redon-Carentoir, d'ar 15 a viz Here 2024

8] Danevell ar c'huzul evezhiañ, pennospital etrekumunel Redon-Carentoir, d'ar 5 a viz Kerzu 2023

9] Danevell ar c'huzul evezhiañ, pennospital etrekumunel Redon-Carentoir, d'an 9 a viz Genver 2025



a-walc'h e vo strishoc'h ar budjedoù e 2026.

E pennospital Breselien eo chomet an traoù a-sav pemp bloaz 'zo, rak diaes e oa kavout un dachenn dieub evit sevel an ospital nevez. « *Riskloù 'zo e vefe roet an arc'hant da bennospitalioù all* » eme Fabrice Dalino, maer Moñforzh ha prezidant kuzul evezhiañ pennospital Breselien, ankeniet. 25 milion a euroioù a zlefe koust adsevel an ospital¹⁰. En o zouez, 7,2 milion a euroioù a zo bet prometet gant ar Stad evit Ségur ar yec'hed, un emglev evit postañ arc'hant en tiez-prederiañ ha gwellaat goprou o labourerien a oa deuet da wir e 2021.

EVIT NEVEZIÑ AN OSPITALIOÙ E RANKER KRESKIÑ AR GOUNIDOÙ...

E Gwitreg ivez e vo ur « *ret-bevañ* » neveziñ ar savadurioù evit ma chomo digor an ospital, hervez un teul diabarzh¹¹ bet lennet gant *Splann* ! e miz Kerzu 2022 e oa bet lakaet 11 milion a euroioù gant an ARS evit an adframmañ. Met koust a rafe 32 vilion a euroioù etre tout, hag evit kavout 20 milion a euroioù ouzhpenn e rank an ospital diskouez e « *zalc'hadusted arc'hantel* », o kaout « *ul live a oberezh uhel a-walc'h evit arc'hantaouiñ e modernaat* ». Met penaos ober muioc'h pa n'eo ket mat ar savadurioù dija ?

10] « Bilan FIR 2024, webinaire CRSA CTS », Kuzuliadeg rannvroel ar yec'hed hag an emrenerezh CTS, d'ar 16 a viz Mae 2025

11] « projet médico-soignant partagé 2019-2023 », pennospital Simone Veil Gwitreg

Anvouezhiañ o deus graet kannaded CGT ha CFDT Redon¹² war steuñv arc'hantaouiñ an neveziñ e miz Genver 2025 rak un digresk bihan en niver a weleoù a oa bet lakaet gant ar renerzh hag an ARS, evit ober muioc'h a brederioù war an deiz peurgetket, met ivez 2 % a obererezh ouzhpenn bep bloaz¹³.

... MET EVIT KRESKIÑ AR GOUNIDOÙ E RANKER NEVEZIÑ

Penaos ober muioc'h o kaout nebeutoc'h ? N'eo ket sur kannaded ar sindikadoù eus ar respont. Anat eo evit ar renerez, er c'hontrol : « *Digreskiñ a ray an dispignoù a surentez hag a nerzh goude prantad kentañ al labourioù, eus un tu, a zispleg Anne Rousselot-Soullière. Hag eus an tu all e vo degemeret gwelloc'h ar glañvourien er savadur nevez. Gant se e c'hellimp desachañ muioc'h a glañvourien hag a vedisined.* »

E Gwengamp eo bet gwiriekat raktres an ospital, sañset, met amprestañ a ranko ober evit kavout ar 56 milion a eurioù a chom war e goust, ha prederiañ muioc'h a dud. Fiziañs en deus Olivier Quéré, mouezh medisined an ospital : « *Daou vloaz 'zo e labouromp muioc'h-mui. Ha goude an adsevel e tigrsko hon dispignoù tommerezh rak n'eo ket difuet an ospital tamm ebet evit poent. Ne vo ket digresket an niver a weleoù tamm ebet, hag ur surjianerezh klok hon o, noz ha deiz. N'eus ket bet emglev ebet gant an*

ARS war ar sujed-se. » Pouezañ a ra ar medisined war ar poent-se rak en un danevell bet goulennet gant an ARS e miz Eost 2022 e oa bet aliet d'an ospital ober surjianerezh war an deiz nemetken, ha klozañ an ti-gwilioudiñ. Ober muioc'h e Gwengamp a oa ar pal, evit kempouezañ stad an arc'hant a oa « *[...] gwall zister, daoust d'ar steuñvoù a oa bet graet evit adkavout ar c'hempouez.* »

Pennospital ar strollad, hini Sant-Brieg, en doa adkemeret an daou soñj-se en e raktres mezegiezh ha prederioù, ur follenn-stur ma vez steuñvet enni an obererezhioù mezegel evit pemp bloaz, eus 2023 da 2028, hag evit pep ospital a zo er strollad.

Paouez gant ar gwilioudoù n'eo ket bet nac'het gant skipailhoù Gwengamp. Abaoe miz Ebrel 2023 ne c'heller ket gwilioudiñ en ospital-se ken, hag e plas an ti-gwilioudiñ e vo « *ur greizenn c'hinekologiezh ha heuliañ ar maouezed brazez.* » Met ober surjianerezh programmet, da lavaret eo war an deiz nemetken, ne oa ket mat da renerezh ospital Gwengamp na d'ar skipailhoù medisined. Nac'het o deus sinañ an teul : « *Delc'her hor surjianerezh klok a fell deomp, n'eo ket posupl labourat war an deiz nemetken gant ar boblañs kozh a zo o chom er vro-mañ* », a zispleg Olivier Quéré. An ARS, a-benn ar fin, en doa lakaet un « *diwall* » war ar raktres mezegiezh ha prederioù, hep lakaat an traoù sklaeroc'h.

12] Danevell ar c'huzul evezhiañ, pennospital Redon-Carentoir, 9 a viz Genver 2025

13] « *Projet d'établissement 2021-2025* », pennospital Redon-Carentoir

« Gwir ne oan ket sur evit ar surjianerezh war an deiz, ouzhpenn eo peurgarget bloc'h-oberata Sant-Brieg, ne vijemp ket bet gouest da adkemer tout ar surjianerezh a vez graet e Gwengamp », eme Régis Delaunay, en deus kemet perzh e skrivañ ar raktres, evel kannad medisined ar strollad ospitalioù, asambles gant ar renerezh. « Met n'em boa nemet ur pal, a oa kendrec'hiñ an ARS da wiriekaat ur raktres sevel-tiez evit Gwengamp, ha da reiñ deomp ur c'hant milion bennak a euroioù d'ar mare-se. Rak gant an arc'hant a c'hounezomp evit poent, ne c'hellomp ket paeañ mont en-dro un ospital hag ouzhpenn da se positañ arc'hant er savadurioù evit ne-veziñ goude » emezañ ouzhpenn.


Resisaat a ra : « 50 % eus kollvezhioù an holl ospitalioù e Breizh o deus hor pevar ospital eus strollad an Arvor asambles. »

NEBEUTOC'H A WELEOÙ MET MUIOC'H A LABOUR : TOULLOÙ-TRAP AN OSPITALAÑ WAR AN DEIZ

En ospital Sant-Brieg ne oa ket bet adkavet al live obererezh a oa a-raok an enkadenn yec'hedel e fin ar bloaz 2024 c'hoazh. E-touez ar re nemeto e oa e mod-se e Breizh, gant 30 milion a euroioù a gollvezhioù e 2024, ha 170 devezh well-wazh a-raok paeañ ar faktu-rennoù. « Al louzoù hag ar boued a vez prenet ganeomp da gentañ. Met embregerezhioù 'zo ne fell ket dezho ober rakprizioù deomp ken, evit labourioù trezalc'h

« N'eo ket posupl labourat war an deiz nemetken gant ar boblañs kozh a zo o chom er vro-mañ. »

peurgetket. Reuz a ra da embregerezhioù ar vro », eme e renerez, Ariane Bénard. Petra a zo kaoz d'ar gollvezh bezañ ket bras ? « C'hwezadur ar prizioù, koust an nerzh, kresk goproù labourerien ar prederiañ bet divizet gant ar Stad e fin enkadenn ar C'hovid » a respont Régis Delaunay. « Ranket en dije ar Stad uhe-laot prizioù chomadennoù ar glañvou-rien evit kompezañ an dispignoù-se evit ma c'hellfemp kaout gounidoù » emezañ ivez o teskrivañ doare arc'hantaouiñ an T2A : depend a ra gounidoù un ospital eus an obererezhioù a vez graet ennañ. Meur a gudenn a sav d'an ospital gant an doare arc'hantaouiñ-se, rak traoù a-enep a vez goulennet gant an ospitalioù. Ur skouer vat eus se eo ar surjianerezh war an deiz.



Achille Ménéard

Abaoe dek vloaz eo digresket an niver a weleoù ha kresket an niver a « *blasoù* » evit klañvourien ospitalaet war an deiz, e medisinerezh pe e surjianerezh, e Sant-Brieg evel e lec'h all. Ar galloudoù publik o deus goulennet gant an holl ospitalioù ober ar cheñchamant-se, gant palioù resis : 70% a surjianerezh war an deiz a-benn 2022 ha 55 % a chomadenoù medisinerezh¹⁴ war an deiz a-benn ar memes bloaz. Met mont a ra ar goulenn-se da skeiñ ouzh moger ar gounidoù a rankfe kreskiñ.

Fabrice Lyszak de Maszary, rener ospital Montroulez, a zispleg an dra-se : « *Izeloc'h eo prizioù ar jestroù a vez graet war an deiz eget ar re a vez graet*

oc'h ospitalañ an dud da vat. Ret eo ober kalz anezho, evel er c'hlinikennoù, evit ma vefe askorus. Kalz gwelloc'h eo evit ar glañvourien, met ur c'holl arc'hant eo evit an ospitalioù. Renerien an ospitalioù a c'houlenn groñs gant ar ministrerezh e vefe kresket ar prizioù-se ». Ar memes tra a voe lavaret deomp gant renerez ospital Sant-Brieg ivez. Ospital skolveur Roazhon n'en deus ket respontet d'hor goulennnoù, met gellet hon eus lenn un notenn guzh skrivet gant ar renerezh evit ar ministr Yannick Neuder pa oa deuet da Roazhon d'ar 7 a viz Genver 2025. « *An tu kreñv bet kemeret gant an oberoù war an deiz [...] a ra kalz gwall da c'hounidoù an ospital* », a oa skrivet enni.

14] « Le virage ambulatoire du système de santé : de nouvelles transformations à engager, en ville comme à l'hôpital », rann V, danevell Lez ar C'hontoù, 2018

E miz Gouere, avat, e c'helled lenn war lec'hienn ar gazetenn *Les Échos*¹⁵ e rankfe an ospitalioù ober gant ar medisinerzh war an deiz evit es-
pern arc'hant e budjed 2026, hervez François Bayrou.

FALL AN TRAOÙ GANT AN OSPITALIOÙ BIHAN

Emañ ospital Sant-Brieg o paouez adkavout al live obererezh en doa a-raok ar C'hovid, abaoe penn-kentañ ar bloaz 2025. « *N'on ket nec'het, war wellaat ez ay an traoù ganeomp. Kalz diaesoc'h e vo evit an ospitalioù bihan* » eme Ariane Bénard, renerez ospital Sant-Brieg, o komz eus ospital Lannuon.

« *Prest da gouezhañ* » eo an ospital distro-se, lec'hiet 50 munut pell eus Sant-Brieg, eme bPascal Lasbleiz, dileuriad CGT an ospital. Ur gollvezh ken uhel hag 20 milion a euroioù a oa gantañ e 2024. E miz Gouere 2024 e skrive Kambr Breizh ar c'hontoù¹⁶ : « *Stadañ a ra ar gambr c'hwitadenn ar steuñvoù adreizhañ bet lakaet e pleustr betek bremañ. N'heller ket mui soñjal postañ arc'hant war an hirdermen ken, neuze. Ankeniusoc'h c'hoazh eo ar stad-se eus an traoù pa ouzer eo uhel feur kozhentez an aveadoù (90 %).* » Kinnig a ra barnerien ar c'hontoù foran uhelaat prizioù an Ehpad evit kempouezañ digresk ar gounidoù.

Evit saveteiñ an ti-yec'hed e ali an ARS abaoe 2022 e tostafe an ospital ouzh liesklinikenn Bro-Dreger. Daou vloaz tabutoù a zo bet, hag a-benn ar fin eo bet dilezet ar raktres kevelerezh publik-prevez-se e miz Genver 2025. N'he deus ket respontet ar glinikenn d'hor goulennoù, met Ariane Bénard, renerez ospital Sant-Brieg, a zispleg an afer gant he sav-poent : « *Nec'het e oa ar glinikenn gant ar stad dister a oa hini an ospital. Soñjal a rae dezho ne vefe ket gouest da bostañ arc'hant evit an traoù hon defe graet asambles. Kreñvoc'h e vijemp bet asambles, emezi gant kerse. Evit gwir, ne soñj ket din e vije plas evit kaout daou di-yec'hed evit poblañs bro Lannuon.* »

Spi a oa evit Lannuon c'hoazh. Un aotre en deus goulennet renerezh Strollad ospitalioù an Arvor gant an ARS evit ma c'hellfe surjianed an ospital oberata krignoù-bev er benvegad koazhañ boued : ar surjianerezh onkologel koazhañ. Met digresket e vo an niver a aotreoù roet gant Ajañs ar yec'hed en Aodoù-an-Arvor. Pevar ospital o doa unan, ospitalioù Sant-Brieg ha Gwengamp evit ar re publik, klinikennoù Plerin ha Bro-Dreger evit ar re brevez. Ne vo ket ken nemet tri a-benn fin ar bloaz 2025, rak un aotre nebeutoc'h a vo a-benn pemp bloaz. Ma vo roet unan da Lannuon e vo lamet e hini digant Gwengamp. « *Efedoù a vo*

15] « Budget 2026 : l'inefficacité des hôpitaux dans le viseur du gouvernement », Solenn Poullennec, *Les Échos*, 12 a viz Eost 2025

16] « Rapport d'observations définitives, centre hospitalier de Lannion, exercices 2018 et suivants », Kambr rannvroel ar C'hontoù Breizh

« D'ar glinikenn e rank mont surjian koazhañ an ospital evit oberata e glañvourien. »

war hon obererezh » eme Jalal Chiouar, medisin e servij ar surjianerezh, gant anken. Met e Lannuon eo bras an dalc'h. Ret eo adkemer rannoù marc'had a zo gant ar glinikenn brevez evit poent. E-touez annezidi bro Lannuon a ra ur chomadenn surjianerezh, ne 'z a nemet 15 % eus ar glañvourien d'an ospital¹⁷, pa 'z a 40 % da lieslinikenn Bro-Dreger. Gwashoc'h c'hoazh, d'ar glinikenn e rank mont surjian koazhañ an ospital evit oberata e glañvourien, rak n'eus nemet gant ar glinikenn ez eus un aotre eus an ARS. Ul lodenn eus amzer-labour ar medisin a vez restaolet d'an ospital gant ar glinikenn, met priz ar chomadenn a zo eviti.

Forzh penaos, bremañ m'eo bet dilezet

an tostaat etre publik ha prevez, « *n'eus raktres all ebet evit Lannuon evit poent* » eme Ariane Bénard c'hoazh. Reolet eo trummadoù Lannuon da noz dizehan abaoe miz Ebrel 2024. E lec'h all e vez ospitalaet hag oberataet ar glañvourien, neuze, ar pezh a ra nebeutoc'h a c'hounidoù, rak 30 % eus obererezh ar bloc'h oberata a zeu eus an trummadoù. E 2019 e teue 68 % eus an dud ospitalaet eus an urjañsoù. N'eo ket ken nemet 11 % e 2023. Mont a ra an traoù war washaat. Nebeutoc'h a obererezh a

zo en ospital, nebeutoc'h a c'hounidoù a zo, ha neuze eo diaesoc'h desachañ mezeien evit klokaat ar strolladoù labour. Hag a-benn ar fin e vez kaset ar glañvourien d'ar glinikenn gant o medisin boas, evit ma vefe graet buan war o zro, evel o deus kontet deomp surjianed eus Lannuon ha Gwengamp. « *Ankeniet on, ya* », eme Ariane Bénard. « *Met n'hon eus ket tu d'ober mod all, rak gant an doare arc'hantaouiñ a zo bremañ, ne c'hell ket ospitalioù eus ar ment-se, o deus trummaoù, ur bloc'h oberata ha prederioù buhezel a ya en-dro noz ha deiz, gounid arc'hant a-walc'h evit en em dennañ.* »

**Isabelle Jarjaille, Caroline Trouillet,
Raphaël da Silva**

¹⁷] « Schéma directeur d'investissement, territoire Trégor – Armor, agence régionale de santé Bretagne, centres hospitaliers de Lannion – Guingamp – Saint Briec », danevell gefridi kaset en-dro eus miz Mae 2021 da viz Gouere 2022

EMAÑ OSPITALIOÙ PUBLIK O KLASK MEDISINED, HA TRUMM

Engouestlet eo labourerien ha labourererezed an ospitalioù evit ar servij publik. Met ur verzhherinti e teu o micherioù da vezañ. Bloavezhioù 'zo e reont gant an diouer a goskor hag an eurvezhioù ouzhpenn, ha setu ma rankfent bezañ prest d'ober war-dro tud bet gloazet er brezel bremañ, hervezh Ministrerezh ar yec'hed. Kalz anezho a zo prest da vont d'ar gennad prevez da labourat, da gaout goprou hag aozioù labour gwelloc'h.



- Muioc'h-mui a studierien a vez stummet war ar medisinerezh, met n'int ket niverus a-walc'h c'hoazh, ha n'eus ket arc'hant a-walc'h evit stummañ anezho.
- Al lezenn Rist he deus lakaet harp da implij al labourerien etretant, met an ospitalioù bihan o deus kollet trumm koskor a veze holl-ret dezho kaout.
- Skuizh e vez medisined an ospitalioù ha mont a ra kalz anezho da glinikennoù prevez da labourat.

Pemp bloavezh eus ma buhez am eus tremenet o vezañ diouzh tro en ospital, pell diouzh ma familh, da noz hag e-pad an dibennoù-sizhun. » Setu ar pezh en deus jedet Dorin Ionesco. Abaoe ugent vloaz emañ ar surjian ginekologour-amiegour, un hanterkant vloaz bennak, o labourat e ti-gwilioudiñ Gwengamp : diouer a goskor a vez eno bepred, ha n'eus ket bet degemeret gwilioud ebet ken abaoe miz Ebrel 2023.

PREST AN TIEZ-GWILIOUDIÑ DA VOUGAÑ : SKOUER GWENGAMP

Ar brasañ diaesterioù evit tuta a gaver en tiez-gwilioudiñ, rak noz ha deiz e ranker kaout ur servij-pad graet gant labourerien eus pemp korf-micher disheñvel : amiegezed, ginekologourien-amiegourien, pediatriourien, anesteziourien ha surjianed ar flugez. Poanuis eo bezañ diouzh tro, neuze seul zistrooc'h ha seul vihanoc'h un ospital, seul ziaesoc'h kavout an holl dud a-vicher a ranker kaout. Ouzhpennomp ne vefe ket askorus an tiez-yeched-se dindan 1.200 gwilioud ar bloaz¹. E Gwengamp,

**« Pa varv ur
c'hrouadur nevez-
ganet, pa vez ur
c'holl-gwad bras,
ma n'eo ket klok ho
skipailh, me 'lavar
deoc'h e vezit hentet
gant se e-pad pell. »**

e 2022, ne veze graet nemet 458, pa oa 750 e 2010. Teir gwech nebeutoc'h a diez-gwilioudiñ a zo e Frañs eget ma oa e 1975, neuze, gant ur feur ganedigezh a ya war zigreskiñ².

Hini Gwengamp a zo chomet digor daoust d'an diaesterioù betek miz Ebrel 2023, daoust d'ar fesonioù klozañ a oa bet klevet meur a wech. E 2018 he doa urzhiet Ajañs rannvroel ar yec'hed e vefe paouezet gant obererezh an ti-gwilioudiñ rak diouer a anesteziourien a oa. Addigoret e oa bet a-benn ar fin da heul ar manifestadegoù bras a oa bet aozet gant tud ar vro, hag abalamour da hanterouriezh Noël Le Graët dreist-holl. Maer kozh Gwengamp a oa prezidant Kevread mell-droad Frañs (FFF) d'ar mare-se, ha tost ouzh Emmanuel Macron. E Moskov e oant, hag e-kreiz abadenn eil diwezhañ kib vell-droad ar bed en doa goulennet gant ar prezidant e chomfe digor an ti-gwilioudiñ.

Daou vloaz repu en doa bet. « Renket e oa bet an afer e div vunutenn e-pad ehan-kreiz ar match », a gontas an *Télégramme*³. E 2022 e oa bet klozet an ti-gwilioudiñ gant an ARS. Hag un dale en doa tapet kaout Noël Le Graët memes mod.

1] « L'avenir de la santé périnatale et son organisation territoriale », danevell kelaouiñ niv. 753, Sened, 10 a viz Gwengolo 2024

2] « La naissance : les maternités », Les établissements de santé en 2022, Renerezh an enklask, ar studiadennoù, ar priziañ hag ar stadegoù, 2024

3] « La maternité de Guingamp ne fermera pas », assure Noël Le Graët », Laurent Rivier, Le Télégramme, 10 a viz Gouere 2022



Padal ne oa ket bet kavet diskoulm ebet evit tuta labourerien a-walc'h. E miz Ebrel 2023 e teuas holl-ret paouez gant servij ar gwilioudiñ. Abaoe neuze n'eus ket bet maouez ebet o wilioudiñ en ospital Gwengamp ken. « 15 amiegezh a rankfemp kaout, n'eus nemet pemp anezho. Pemp medisiner hon defe da gaout da nebeutañ, n'eus nemet daou bost-labour kevatal da implijoù leun-amzer. N'hon eus ket bet pediater ebet war al lec'h james. Hag an anesteziourien ne fell ket dezho labourat en amiegouriezh », a zispleg ar penn-ginekologour Dorin Ionesco. « Mareoù gant bec'h-spontus hon eus bevet. Pa varv ur c'hrouadur nevez-ganet, pa vez ur c'holl-gwad bras, ma n'eo ket klok ho skipailh, me 'lavar deoc'h

e vezit hentet gant se e-pad pell, hag ur prosez a c'hellit kaout », emezañ ouzhpenn.

« Met tout an dra-se a c'halled gouzout abaoe pell. Pa oan en em gavet e 2004 e oa bet lavaret din e c'hellfe klozañ, dija. Tamm-ha-tamm e oa nebeutoc'h a goskor ha berroc'h-berrañ e teue ar c'hevratou da vezañ, gant ar fesoniou astaliñ a oa. »

Penaos kendrec'hiñ kenseurted ha kenseurtezed da zont da labourat en un ti-gwilioudiñ a c'hellfe bezañ klozet n'eus forzh peur ? « Soñj 'm eus bezañ graet kantadoù a bellgomzadennoù evit kavout tud da zont da labourat ganeomp, ha goulennet e veze ganin : Met petra 'c'hoarvezo, a-benn ar fin, gant an ti-gwilioudiñ-se ? »

POLITIKEREZH HA MEDIAOÙ : ARABAT KLOZAÑ HON TI-GWILIOUDIÑ

Ehanet eo an ti-gwilioudiñ, ez-ofisiel, met n'eo ket serret da vat. Diferadoù astalañ a vez kemeret gant an ARS, hep na vije bet divizet ganto klozañ anezhañ. Dañjerus eo klozañ un ti-gwilioudiñ da vat « *Arvarus-bras eo war an dachenn bolitikel. Ne c'hellomp-ni ober seurt ebet, ar ministerezh eo a ziviz bremañ* », eme Olivier Quéré, dileuriad medisined ospital Gwengamp.

Arvarus e voe klozañ ti-gwilioudiñ Karaez, ivez, evel ma oa bet divizet e 2008 gant un Ajañs a oa anezhi a-raok an ARS, Ajañs rannvroel an ospitalañ (ARH). Amiegezed oc'h ober harz-debriñ, savadurioù aloubet, hentoù stanket, manifestadegoù bras-divent, stokadennoù gant ar polis hag ar CRSed... Daou viz emsav o doa bodet Karaeziz a-yoc'h ha dilennidi, gant Kristian Troadeg, maer Karaez, er c'hentañ renk, betek ma voe nullet klozañ an ti-gwilioudiñ gant lez-varn velestradurel Roazhon⁴.

Engravet eo ar c'heñverioù-nerzh-se en darempredoù etre ospital skol-veur Brest hag ospital Karaez, a zo deuet d'ober un ensavadur nemetken abaoe m'int bet kendeuzet e 2009. « *Ma lavarfen-me e c'hellfe ti-gwilioudiñ*

Karaez bezañ klozet un devezh bennak, ma m'hen gouezfe Kristian Troadeg, Aotrou maer Karaez, e vefe fall-tre ar jeu ! [...] », a embannas Bertrand Fénoll⁵, a oa neuze prezidant bodad mezegiezh ospital skol-veur Brest, da vare emgavioù micherel e 2014. « *Evit gouzout hag e c'heller serriñ ti-gwilioudiñ Karaez e ranker gouzout hag e c'heller paeañ ur gompagnunezh jandarmed e-pad c'hwec'h miz !* », a ouzhpenn-eñ gant mousfent.

En ul lec'h distro emañ ti-gwilioudiñ Karaez, hag an dra-se a warez anezhañ ouzhpenn d'an dalc'hoù politikel, ha betek bremañ, rak 45 munutenn hent a zo etrezañ hag an ti-gwilioudiñ tostañ. Ennañ e vez degemeret war-dro 200 ganedigezh bep bloaz, c'hoazh. Posupl eo rak amiegezed Karaez a vez o labourat en ospital skol-veur Brest viez, war bostoù « *rannet* ».

MEDISINED WAR BOSTOÙ RANNET : UR MENNOZH MAT EO ?

Ur strategiezh pronet gant ar galloudoù publik evit merañ an diouer a labourerien eo an « *embreg boutin* »⁶, da lavaret eo rannañ ar c'hoskor etre meur a ospital. En trummadoù e vez graet, alies, rak peurgarget eo o servijoù, e pep lec'h e Breizh (gwelout rann 1).

Ar ministr dileuriet evit ar yec'hed,

4] « Hôpital de Carhaix : le TA annule la fermeture partielle », Xavier Debontride, Gazette des communes, 25 a viz Even 2008

5] « Bertrand Fenoll, président de la CME du CHU de Brest », Emgavioù ar Baol, Youtube, 8 a viz Here 2015, pajenn Web bet gwelet e miz Du 2025

6] « Note d'information sur l'actualisation du PRS sur l'activité Aide Médicale Urgente (AMU) », Ajañs rannvroel ar yec'hed e Breizh, 10 a viz Meurzh 2025

Yannick Neuder, en doa roet da c'houzout d'an 13 a viz Mezheven 2025 e vefe krouet postoù rannet. Sinañ a reas ivez kenemglev ur « *c'hevread medisinerzh etre-ospitalioù trummadoù Breizh-Izel* »⁷ gant ospitalioù Penn-ar-Bed. Brasaat « *ar c'hengred tiriadel hag an embreg boutin* » eo ar pal, hag addigeriñ servij an trummadoù en ospital Karaez, a vez reolet noz ha deiz abaoe an hañv 2023.

Met diaes-kenañ eo an « *embreg boutin* » etre urjañsoù Brest ha Karaez evit poent. E miz Gwengolo 2023 e oa bet aloubet salioù an ARS e Kemper⁸ gant un tri-ugent manifester ha dilennad bennak evit goulenn e vefe addigoret an trummadoù, rak reolet e oant noz ha deiz. Ur mizvezh war-lerc'h e voe sinet un emglev etre an ARS, an dilennidi ha renerezh ospitalioù Brest ha Karaez. Ha diouzhtu goude e voe lakaet en arvar gant harz-labour

« Ur gwallzarvoud am eus bet goude un nozvezh a-bezh diouzh tro, hep kousket muioc'h eget div eurvezh. »

didermen medisined trummadoù Brest, a lavare e oa un diouer a goskor eus o zu. Tennañ diwar kof Brest evit lakaat war gein Karaez ? Ne vo ket. E fin ar gont e voe kavet un dis-koulm diwezhañ. Medisined an advagad yec'hedel, a zo damheñvel eus an adarme e tachenn ar yec'hed, a voe lakaet da zont. Ha ret e voe gortoz

7] « Protocole de sortie de crise et de développement de l'hôpital de Carhaix : le comité de suivi s'est à nouveau réuni le vendredi 11 juillet pour partager les premières recommandations de la mission de la Société française de médecine d'urgence (SFMU) et les objectifs associés à la création de la fédération médicale inter-hospitalière (FMIH) des urgences de Bretagne occidentale », kemennadenn d'ar gazetennerien, Prefeti Penn-ar-Bed hag Ajañs rannvroel ar yec'hed e Breizh, 16 a viz Gouere 2025

8] « Occupation des locaux de la délégation départementale de l'Agence régionale de santé de Quimper : le blocage est levé », kemennadenn d'ar gazetennerien, Prefeti Penn-ar-Bed, 14 a viz Gwengolo 2023

Tennañ diwar kof Brest evit lakaat war gein Karaez ?

ar strivoù. Stard e c'hell bezañ evito. Hag alies n'eo ket dedennus ar postoù rannet rak pounneroc'h eo karg al labour, ret eo ober gant daou zoare disheñvel da aozañ al labour hag e vezer alies war an hent », eme vMarie-Hélène Aleman-Trevidic, dileuriadez medisined an ospital.

an 8 a viz Gwengolo 2025 evit ma vije tutet ur medisined e trummadoù Karaez, war ur post n'eo ket rannet. Daou vloaz goude ma voe sinet ar c'henemglev.

Renerezh ospital skol-veur Brest hag Ajañs rannvroel ar yec'hed n'o deus ket respontet d'hor goulennoù atersiñ war an tem-se. Medisined ospital o deus labouret e Karaez evit lod pa oa o fost-labour en un ospital all o deus digoret o c'halon deomp, avat. « *Pa 'z oc'h bet un nozvezh a-bezh diouzh tro hep kousket muioc'h eget div eurvezh, n'eo ket posupl bezañ un eurvezh war an hent o vezañ skuih-divi. Ur gwallzarvoud am eus bet e mod-se. Da 45 bloaz, o kaout ur familh, ne fell ket din ober an dra-se ken.* » Distro eo ospital Pondi ivez, ha ne fell ket da vedisined trummadoù an Oriant mont di da labourat. « *Pa n'eus den ebet o lakaat e anv evit mont war bostoù rannet e rank tud skipailh an Oriant ober*

Kefridi a zo bet roet gant ar ministerezh da Benn-ensellerezh an arc'hant ha da Benn-ensellerezh an aferioù sokial (IGF hag IGAS) da « *greñvaat mestroniañ kalzad ar goprou* » ha d'ober muioc'h a genlodennañ, hervez *Mediapart*⁹. Gant ar postoù kenlodenet e vez nebeutoc'h a bostoù-labour, ha nebeutoc'h a zispignoù. A-benn pemp bloaz e vo kollet etre 9 ha 13 post servij pad e surjianerezh abalamour da « *aozadurioù tiriadel kenlodenet pe rannet* »¹⁰.

MUIOC'H A STUDIERIEN DIPLOMET, N'O DEUS KET PEADRA DA VEZAÑ STUMMET

Yannick Neuder, ministr dileuriet evit ar yec'hed, en doa keloù mat da zegas da Benn-ar-Bed pa oa deuet e miz Mezheven 2025, memes tra. « *A-benn un nebeud sizhunvezhioù e kinnigin ul*

9] « Réformes structurelles : et maintenant, au tour de l'hôpital », Mathias Thépot, *Mediapart*, 13 a viz Eost 2025

10] « Révision du PRS - printemps 2025 : permanence des soins en établissements de santé, médecine d'urgence et médecine », Ajañs rannvroel ar yec'hed e Breizh, ministrerezh ar Yec'hed, 25 a viz Even 2025

lezenn evit paouez gant an *numerus clausus*. » Keloù nevez ne oa ket. N'eus ket mui eus an *numerus clausus* ken abaoe 2019 hag al Lezenn a denn eus aozañ ha kemm ar reizhiad yec'hed, ez-ofisiel. Un *numerus apertus* a zo bet lakaet en e blas. Hervez « *barr degemer ar skolioù-meur* » e vez an niver a blasoù digor e kenstrivadegoù kevrennoù ar veze-giezh abaoe neuze, ha n'eus ket mui a niver divizet en a-raok. Met « *muioc'h a blasoù a zo bet digoret evit ar studierien hep na vije roet d'ar skolioù-meur peadra da zegemer anezho* », en deus lavaret ur surjian anesteziour deomp.

E 2024 e oa 509 post diabarzhiaad a oa digor evit an arbennigiezh anesteziezh¹¹. A-us d'ar 465 post a oa e 2019. Met dindan an ezhommoù emañ c'hoazh. « *600 diabarzhiaad a rankfemp kaout bep bloaz da nebeutañ evit respont d'an ezhommoù* » a gav d'ar medisin anesteziour, gant sifroù Sindikad broadel embregourien ospital an anesteziezh hag an advevaat (SNPHARE). Ha n'eo ket kresket kalz an niver a vedisined stummet en arbennigiezhioù all e Breizh : 44 post surjian e 2024 pa oa 40 e 2018 ; 23 post medisin an trumadoù e 2024, evel e 2018 ; 19 post e radiologiezh pa oa 15 e 2018.

« Dispignet eo bet evit al labour etretant 44 % eus ar frejoù hollek evit ar c'hoskor mezegiezh, en ospital Kreiz-Breizh e Pondi. »

Pal lezenn Yannick Neuder a zo kreskiñ an niver a vedisined stummet, o pourveziñ arc'hant ha koskor d'ar skolioù-meur, hervez an ezhommoù bet kavet gant Ajañsoù rannvroel ar yec'hed. Votet eo bet a-du gant ar Sened hag ar Vodadenn vroadel, hag

embannet d'ar 27 a viz Mezheven 2025. A-du emañ an holl strolladoù politikel ganti. Padal e stoko ouzh diskar ar budjed a zo bet kemennet gant François Bayrou evit ar bloavezh 2026 : 44 miliard a euroioù da arboellañ

e budjed ar Stad, 5 miliard e budjed ar Surentez Sokial en o zouez. Kouezhet eo ar raktres budjed-se asambles gant ar gouarnamant d'an 8 a viz Gwengolo paseet, met kazi-sur ez aio ar budjed da zont war ar memes hent.

DAOUST HA RET EO PAOUEZ GANT AL LABOUR ETRETANT EN OSPITAL ?

An ospitalioù distro, re an Argoad hag ar re vihanañ eo ar re a c'houzañv ar muiañ gant an diouer a goskor. An diskoulm bet kavet ganto a zo tuta medisined etretant, labourerien goust-tre a vez kavet en ospitalioù bihan dreist-holl. En ul lizher bet kaset da renerezed ha renerien an ARSoù

11] Diferad eus ar 7 a viz Gouere 2024 diwar-benn rannañ al lec'hioù kinniget d'ar studierien o deus tremenet an arnodennoù renkañ broadel dizanv a ro tro da vont d'an trede rummad studioù mezegiezh evit ar bloavezh skol 2024-2025, Journal officiel, 9 a viz Gouere 2024



Achille Ménard

d'an 23 a viz Ebrel 2025 e c'houlenne François Bayrou¹² ganto « heuliañ pizh an dispignoù a vez graet evit ar prenañ hag ar c'hoskor ». « Aketus e voc'h dreist-holl ouzh an dispignoù evit ar c'hoskor etretant, a zo bet kreñvaet ar sterniañ anezho », a skrive ivez.

Ospitalioù skol-veur Brest ha Roazhon o doa dispignet ouzhpenn 2 vilion a euroioù evit goprañ medisined etretant e 2024, ar pezh a rae 3 % eus o budjed hollek evit ar c'hoskor mezegiezh. En ospital Gwengamp, avat, e oa 20 %, ha 17 % e Lannuon. Ha betek 6 milion a euroioù, da lavaret eo 44 % eus ar frejoù hollek evit ar c'hoskor mezegiezh, en ospital Kreiz-Breizh e Pondi. Teir gwech muoc'h

eget e 2021. Diaes eo ar c'hresk-se da gompren pa oa bet bevennet gopr ar vedisined etretant gant al lezenn Rist, a oa e talvoud abaoe miz Ebrel 2021. Sañset e oa da lakaat harz da gresk an dispignoù-se e-pad ar bloavezhioù war-lerc'h.

« War-well eo aet an traoù evidomp gant al lezenn-se » eme Fabrice Liszak de Maszary, rener ospital Montroulez. « Ne oan ket ken evit gouzañv ar vedisined a varc'hatae evit al leti hag ar bilhed karri-nij peogwir e oant o tont eus Cannes pe eus Nisa. Pellgomz a raent d'an derc'hent da lavaret e veze kinniget 10 % dezho ouzhpenn e Sant-Brieg. Ha ma ne greskemp ket o gopr, ne zeuent ket. Ken uhel ha 3.000 euro evit 24 eurvezh e c'helle

12] Kelc'hiad diwar-benn efedusted ha perzhded ar stalioù yec'hed, Kentañ Ministr, 23 a viz Ebrel 2025

mont. » Ar memes santimant o doa ar renerien hag ar renerezed ospitalioù hon eus kejet outo. Met gwall efedoù a zo bet eus tu ar re vihanañ ivez.

Aet e oa kuit ar vedisined etretant eus an eil deiz d'egile. « 50 % eus ar re a labour e Pondi a zo aet war o leve diouzhtu pa voe lakaet al lezenn da dalvezout, e miz Ebrel 2021. E servijoù ma 'z eo diaes-tre kavout koskor, pedia-triezh, anesteziezh, trummadoù », a zisplege Marie-Hélène Aleman-Trevidic deomp. Evit kemer plas ar vedisined etretant ez eus bet tutet medisined gevatet gant renerezed an ospitalioù. Sañset int da vezañ tutet gant ur pal hag evit ur mare resis-tre. Goprou kalz uheloc'h eget reoù o c'henlabourerien ditlet o deus marc'hataet ar vedisined-se. Ha da echuiñ, ar vedisined etretant o deus tapet kaout goprou ken uhel ha bevenn uhelañ al lezenn Rist, ar re a veze paeet nebeutoc'h a-raok zoken. « *Setu perak eo kresket ken buan ar frejoù evit al labour etretant e Pondi* », a resisae an Itron Aleman-Trevidic c'hoazh.

Evit kemer plas ar vedisined etretant ez eus bet tutet medisined gevatet gant renerezed an ospitalioù. Sañset int da vezañ tutet gant ur pal hag evit ur mare resis-tre. Goprou kalz uheloc'h eget reoù o c'henlabourerien ditlet o deus marc'hataet ar vedisined-se. Ha da echuiñ, ar vedisined etretant o deus tapet kaout goprou

ken uhel ha bevenn uhelañ al lezenn Rist, ar re a veze paeet nebeutoc'h a-raok zoken. « *Setu perak eo kresket ken buan ar frejoù evit al labour etretant e Pondi* », a resisae an Itron Aleman-Trevidic c'hoazh.

Met gwashoc'h c'hoaz zo : d'ar 5 a viz Kerzu e oa bet kresket kalz ar bevenn war an goprou evit ar vedisined etretant gant un dekred nevez. 1,410 euro kriz e oa evit an devezh mezegel 24 eurvezh e 2023, 2,681 euro kriz eo bremañ. Setu disoc'h gwask sindikad broadel ar vedisined etretant¹³, en doa disklêriet talvoudegezh dekred kentañ 2023 dirak ar C'huzul-Stad.

Penaos e c'hallou renerezhioù an ospitalioù reiñ an « *evezh ispisial* » d'o dispignoù etretant, evel ma oa bet goulennet gant ar gouarnamant er prantad-se ?

POAN AR VEDISINED HA LABOURERIEN AR PREDER : N'EUS DEN O SELAOU

« *N'on ket a-enep da ziazezoù al lezenn Rist. Met gwellaat statud an embregourien ospital ditlet a vije bet dav ober memes koulz* » eme vMarie-Hélène Aleman-Trevidic c'hoazh. Da heul enkadenn ar C'hovid e voe gwellaet goprou an embregerien ospital e penn-kentañ hag e fin o red-micher. Met n'eus ket bet seurt ebet evit ar re a oa e-kreiz o red-micher, bet tutet a-raok 2020. Padal e reont 80 % eus ar

13] « Intérim médical : le plafond de dépenses des hôpitaux pour les médecins intérimaires réévalué à 2 681 euros la journée, contre 1 410 euros actuellement », site web France Info, 12 a viz Gwengolo 2025

Ur c'hlemm a-enep tri minist evit « feulster marvus, denlazh diratozh ha lakaat un den en arvar ».

mont kuit : « Pa dremenan en trepa-soù diouzh mintin o stouiñ ma fenn fas d'an 30 klañvour a zo o c'hortoz, pa soñjan : "n'hellan ket kaout emell ouzhoc'h", ha pa zeuomp da walldre-tiñ an dud, neuze n'ouzon ket petra on deuet da vezañ. » Setu ar pezh en doa kontet deomp nebeut goude bezañ bet taget. Met re domm e oa ouzh e vicher, hag abaoe neuze eo deuet da

c'hoskor. « *Evel-just n'hon oa mod ebet da zesachañ anezho* », emezi da echuiñ.

Hag evit gwir e kuitaas meur a benn-servij hag a vedisin e labour e Pondi en diskar-amzer 2023. Penn an trummadoù hag ar SMUR a oa en o zouez : « *Bevañ a rae evit an trummaoù. Gwelet a raemp anezhañ o vont war fallaat, ankeniet e oamp evitañ. Hag en em zistrujet 'oa ur c'henseurt en e servij dezhañ, en trummadoù. D'an deiz-se 'oa aet an traoù re bell evitañ* », eme vMarie-Hélène Aleman-Trevidic.

Ar surjian ortopedour Arthur Lignel a zivizas eus e du mont da labourat d'ar glinikenn brevez a zo e-kichen an ospital. Ambroise le Floc'h, medisin en trummadoù, a voe taget gant ur c'hlañvour e miz Here eus ar memes bloaz. Re 'oa re, neuze. Divizout a reas

vezañ penn servij an trummadoù.

D'an 10 a viz Ebrel 2025 o doa savet klemm ur strollad ugent den bennak graet gant un klañvdiourien, renerien ospital, kelennerien skol-veur-embregourien ospital ha tud kar da dud en em zistrujas e Frañs, evit « *harellerezh spered, feulster marvus, denlazh diratozh ha lakaat un den en arvar* » dirak Lezvarn ar Republik. Tamallet ez eus tri ministr : Catherine Vautrin, ministrerez al Labour, ar Yec'hed hag ar C'hengredoù, Yannick Neuder, ministr dileuriet evit ar Yec'hed hag an diraez d'ar prederioù, hag Élisabeth Borne, ministrerez an Deskadurezh-Stad, met ivez an Deskadurezh uhel hag an Enklask. « *Kelaouet eo bet ar vinistred war-eeun* » eus poan koskor

an ospitalioù, hervez o alvokadez, Christelle Maza¹⁴.

Ken abred ha miz Genver 2020, ouzhpenn da 50 penn-servij eus Breizh a roas o dilez eus o c'hargoù melestradurel gant harp ar c'henstrollad etre ospitalioù dija. Goulenn a raent e vefe kresket goprou ar c'hoskor ledveze-gel, ar budjedoù, ha fell a rae dezho cheñch ar mod da arc'hantaouiñ ha da ouarn an ospitalioù. « *En em gavet eo ar C'hovid goude, ha rediet omp bet da adkemer hor c'hargoù* », eme vMichel Nonent, penn ar servij skeudennerezh en ospital skol-veur Brest, didouellet. Sur e oa Marie-Hélène Aleman-Trevidic ne oa ket tonket ar vedisined da guitaat an ospitalioù. Dileuriadez medisined ospital Pondi he doa divizet e 2023 labourat war gwir europat al labour ha testennoù statud melestradurezh publik an ospitalioù evit kavout diskoulmoù enno. Savet he doa ur steuñv a-ratozh-kaer evit bevenniñ an niver a eurvezhioù ouzhpenn, peurgetket, « *o c'hortoz dont da vezañ dedennus a-walc'h evit ma teufe tud all da labourat ganeomp, hag ober a-seurt ma c'hello an holl labourat 39 eurvezh bep sizhun. Krediñ a ran start eo posupl. Degemeret mat-tre e oa bet ar steuñv gant ar vedisined amañ, spi o devez ar vedisined pa ziwallar outo a-benn ar fin* ». N'eus ket anv eus he steuñv ken daou vloaz war-lerc'h. Cheñchet eo rene-rezh an ospital, ha « *n'eo ket ur sujed o deus choazet labourat warnañ, met*


kreñvaat ar strolladoù-labour asambles gant ospital an Orient », a zispleg Marie-Hélène Aleman-Trevidic deomp, dipitet ma 'z eo. Da gannaded ha senedou-rien ar vro he doa roet he steuñv abaoe, da Bennrenerezh ar c'hinnig prederioù (DGOS) ha d'an ARS. Hini ebet anezho n'en deus respontet dezhi, emezi.

GALV AR GENNAD PREVEZ

Kinnigoù labour gant klinikennoù prevez o deus bet an holl vedisined ispisializet war an trummadoù, ginekologourien-amiegourien ha surjianed hon eus kejet outo. « *Kinniget e vez deomp bezañ paeet div wech muioc'h eget en ospital, gant pevar devezh labour bep sizhun, eus 8 eur da 5 eur30* », eme Younès Boulhaia, surjian ortopedour e Gwengamp.

Pa 'z eo ken brav an aozioù labour er c'hlinikennoù eo tenn ar c'heveze-rezh gant an ospitalioù publik, a zo o stourm ouzh ar gennad prevez war an obererezhioù askorus dija. N'eo ket disheñvel ar pezh a lavar ur vedisinez en ospital skol-veur Roazhon. War he fost-labour emañ abaoe 15 bloaz ha gwelet a ra kalz kenseurted dezhi mont d'ar gennad prevez da labourat. « *200 € e vezomp paeet evit un nozvezh diouzh tro en ospital, met d'an deiz war-lerc'h e rankomp bezañ o labourat, ha pa vijemp bet galvet e-kreiz an noz. Ar vedisined yaouank, bremañ, a fell dezho kaout amzer hag arc'hant* » emezi, gouzañvus. Ouzhpenn da se, emezi, an

14] « *Il faut appliquer à l'hôpital la jurisprudence France Télécom* », selon Me Maza qui dépose plainte contre trois ministres », Sébastien Garnier, Ici Hérault, 15 a viz Ebrel 2025



embregerien ospital « o deus ar santimant a-wechoù e teu d'an ospital publik ar glañvourien ne fell ket d'ar gennad prevez kaout, ar santimant eo an ospital da vezañ ur "boubellenn" evit ar c'hlinikennoù, gant klañvourien gemmesk, meur a gleñved dezho ». Roudoù an dra-se a gaver en un danevell bet embannet gant Lez ar c'hontoù¹⁵ diwar-benn an tiez-yeched publik ha prevez : « E 2019, o kemer an holl chomadenoù, pep klañvour bet degemeret en tiez-yeched publik a oa skoed gant kazi c'hwec'h kleñved, well-wazh, kazi pevar c'hleñved en tiez-yeched prevez hep pal arc'hantus, ha kazi tri c'hleñved evit klañvourien an tiez-yeched gant ur

pal arc'hantus. »

Korvoder bloaziek ur medisin frank a zo 120.000 €, dreist-holl, ha 150.000 € evit ur medisin arbennik. Ur medisin ospital e fin e red-labour, d'an derez 13, a c'hounezo 112.416 € bloaziek kriz, avat, hervez kloued feuriadoù an embregerien ospital. Setu ar pezh a lavare ur medisin arbennik hag a labour en unan eus tiez-yeched Vivalto Santé e Breizh : gant 15 bloaz a red-labour hag « o labourat tri devezh ar sizhun e vezan paeet kement hag un embreger ospital leun-amzer e fin e red-labour ».

Padal e vez diaes tuta er gennad prevez, zoken. E pennospital prevez Sant-Gregor « e labourer da 100 % eus

15] « Les établissements de santé publics et privés, entre concurrence et complémentarité », danevell, Lez ar c'hontoù, miz Here 2023

ar c'hoskor er bloc'h oberata abaoe miz Genver 2025. Goude ar C'hovid hon eus ranket lakaat ur steuñv evit dedennañ an dud ha lakaat anezho da zont en-dro, ar glañvdiourien peurgetket, ha kevezerezh spontus a zo etre ar c'hlinikennoù prevez, d'an hini a ginnigo ar goproù uhelañ » eme ar medisin c'hoazh. Reolet eo bet trumadoù an ti-yec'hed-se, ivez, evel re an ospitalioù publik, an hañv paseet, peogwir e oa diaes dezho tuta.

Gouzañv a ra an holl diez-yec'hed, publik pe brevez, gant an diouer a vedisined. Siwazh, n'eo ket echu gant ar vedisined ha labourerien ar preder poaniañ. Ret eo dezho bezañ prest da blediñ gant efedoù yec'hedel ur brezel, a-raok miz Meurzh 2026. N'eo ket skeudenn ar « brezel » en doa graet Emmanuel Macron ganti da vare ar

C'hovid, met ur brezel gwir ar wech-mañ. Hervez ar gazetenn *Le Canard enchaîné*¹⁶, ministrerezh ar yec'hed en doa kelaouet Ajañsoù rannvroel ar yec'hed e miz Gouere paseet e c'hellfe Frañs dont da vezañ diaz a-dreñv ur brezel bras e-doug ar mizvezhioù o tont. Prederiañ miliadoù a soudarded c'hall hag estren a rankfe labourerien an ospitalioù bezañ prest d'ober, neuze, hep kaout muioc'h a arc'hant nag a labourerien. Ar pezh a c'hellfe echuiñ da vat gant ar gwir da bep hini da vezañ prederiet, a zo gwarezet gant ar Vonreizh, met a vez distrujet gant ar politikezhioù a vez graet abaoe 50 bloaz.

**Isabelle Jarjaille, Caroline Trouillet,
Raphaël da Silva**

16] « Le ministère de la Santé mobilise les hôpitaux pour la guerre », Fanny Ruz-Guindos, *Le Canard enchaîné*, 26 a viz Eost 2025



Koumanantit d'hol lizher-kelaouiñ

Resevit bep miz keleier ha ne gaver neblec'h all ebet, ha bezit kelaouet bep tro ma vez embannet un enklask nevez ganeomp. Digoust eo ! Evit en em enskrivañ : splann.org/infolettre

Hag anavezout a rit Splann ! ?

Ur strollad kazetennerien o labourat e Breizh omp, c'hoant ganeomp kelaouiñ diwar-benn an endro ha gwirioù mab den lakaet en arvar. Abalamour ma oa bet klasket gant tud'zo mirout ouzh kelaouennerien d'ober o micher dre gas anezho dirak ar justis ha spontañ anezho (Ines Leraud en o zouez), hon doa divizet krouiñ *Splann !* e 2020.

Diwar skouer *Disclose*, hor media paeron, e fell deomp kas enklaskoù da benn ha lakaat anezho en linenn war hol lec'hienn, ha war reoù mediaoù kevelerien, en ur mod digoust, e galleg hag e brezhoneg.

En deiz a hiriv zo ur skipailh kazetennerien gopret gant *Splann !* o labourat en hor sez e Gwengamp. Kelaouennerien all a vez paeet ganeomp d'ober an enklaskoù ha tud a youl-vat a vez o sikour e meur a vod evit kas hor c'hefridi da benn.

Ur media dizalc'h...

Evit gellout lakaat hor fri e-barzh aferioù kizidig e rankomp bezañ dizalc'h e-keñver ar gal-loudoù politikel hag ekonomikel a-bep-seurt. Ablam da se e nac'homp degemer arc'hant liammet gant bruderezh ha yalc'hadoù digant ar strollegezhioù lec'hel. Diwar donezonoù kantadoù a lennerien (erezed) e vev *Splann !*

Ar stumm kevredigezhel a zo ur mod deomp da chom emren ha mestr war hor media. Levezon ebet o pouezañ warnomp gant kevranerion binvidik. Izili hor c'huzul-merañ a vez dilennet bep daou vloaz, hag ur c'huzul-evezhiañ a zo bet krouet ganeomp evit ma vo doujet d'hor statutoù, dreist-holl e-keñver orin an arc'hant dastumet ganeomp. Ur c'huzul stur-embann a zo ivez, dezhañ da zibab danvez hon enklaskoù.

a zifenn ar c'hazetennerezh a hir dermen...

War an tu kontrol eus an tabutoù a ra o reuz war platoioù ar chadennoù « keleier penn-da-benn », e labouromp da-vat war doserioù luziet, ha talvoudus evit an holl. Eus saotra-durioù an uzinoù betek ar feulster revel en Iliz katolik, freuz ar c'harzhaoueg, dismantr ar servijoù publik, e kasomp da vat enklaskoù a hir dermen, o sevel skipailhoù kazetennerien gouest da studiañ an aferioù e-pad mizvezhioù ha mizvezhioù.

Ur wech embannet an enklaskoù ganeomp e kendalc'homp da chom war evezh evit degas keleier fresk diwar-benn an aferioù-se, dre hol lizher-kelaouiñ digoust, bep tro ma vez dav.

evit bezañ kaoz eus cheñchamantoù war vat

D'hor soñj n'eo ket ar gazetennnerien arvestourien bennak buhez ar bed. En enep da se ez int aktourien pennañ a gas treuzfurmadur ar gevredigezh. Ar pezh a fell deomp ober eo reiñ ur ster da zardvoudoù hor bed, lakaat war wel ar pezh a fellfe d'an dud galloudus

kuzhat, ha reiñ da c'hoût da bep hini penaos en em zifenn eus ar gwalloberioù war an endro, war an onestiz ha war wirioù mab-den.

Evit se e rank hol labour kazetennerezh enklask bezañ skignet puilh. Setu perak emomp e darempred gant mediaoù lec'hel, broadel hag etrevroadel zoken, evel *France 3 Breizh*, *Reporterre* pe *Mediapart*.

Da-bep-seurt mediaoù e fell deomp kinnig hon enklaskoù da embann, a-benn kizidikaat lennerien ha selaouerien nevez, dre ober gant an abadennoù podkast, video, pe moulladurioù levrioùigoù.

E lec'hioù a-bep-seurt ez eomp da ginnig hol labour war an dachenn, er skolioù, er salioù lies implij, pe er festivalioù, pedet gant kelennerien, levrierien pe kevridegezhioù.

Bevañ a ra Splann ! diwar ho tonezonoù



E 2024 e teue 72 % eus arc'hant Splann ! eus an donezonoù, poentek pe miziek, roet hep tamm eskemm ebet gant 1.800 lennerez ha lenner. Deomp eo ur redi evit dont a-benn d'ober al labour kazetennerezh enklask dizalc'h a zifennomp.

O vezañ ma n'hon eus tamm ranndal ebet da resteurel da zen, e c'hell an arc'hant dastumet lakaat hor skipailh skridaozañ da greskiñ. E 2024 neuze, e oa bet gouestlet div drederenn eus hor dispignoù d'ar goproù, dirak ar produiñ videoioù, tresadennoù, stlenngraferezh ha frejoù justis liammet gant hon enklaskoù.

Diouzh ho tonezonoù e vo an dazont. O vezañ ma ra Splann ! labour a-laz hollek e c'hellit tennañ betek 66 % eus ho prof diwar ho tailhoù.

Gallout a rit reiñ :

enlinenn dre ar chomlec'h : splann.org/br/archantaouin

gant ur chekenn war anv *Splann !* : kaset da *Splann !*

Ti ar vro, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Titouroù da gas deomp ?

Titouroù pouezus evit ar gevredigezh 'zo ganeoc'h ? Dokumantoù kizidig pe danvezioù e rankfe Splann ! enklask diwar o fennoù ?

Kasit deomp ur postel kentañ gant ur chomlec'h hep hoc'h anv (gant un anv fals ma karit) a-benn displegañ deomp eus petra 'zo kaoz berr-ha-berr. Gwelloc'h eo implijout posteloù evel Protonmail. Respontet 'vo deoc'h penaos ober evit kenderc'hel an tabut ha kas deomp an dokumantoù.

Mont en darempred

contact@splann.org

Splann !, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Lennit hon enklaskoù diwezhañ war splann.org

- Breizh : *c'hwezh an amoniak er maez*, Caroline Trouillet, miz Even 2021
- Iberdrola. *Pa vez louz ar jeu gant an energiezh « naet »*, Itzel Marie Diaz, Lena Lopes, miz Meurzh 2022
- Metan : *Bec'h d'an atant*, Julie Lallouët-Geffroy, Raphaël Baldos, miz Gwengolo 2022
- Essure : *drouk mouget e korf ar merc'hed*, Juliette Cabaço-Roger, Faustine Sternberg, Guy Pichard, Rozenn Le Carboulec, miz Here 2022
- Moc'h fall, Inès Léraud, Kristen Falc'hon, Floriane Louison, miz Gouere 2022
- Brezel ar parkeier, Julie Lallouët-Geffroy, miz Gwengolo 2023
- Cooperl : *enklask war un embregerezh pemoc'h ramzel*, Kristen Falc'hon, Ivan Logvenoff, miz Du 2023
- Keuzioù *ha girzhier en arvar*, Yann-Malo Kerbrat, Nolwenn Weiler, C'hwevrer 2024
- Klañv eo porzh Sant-Nazer gant e industriezhioù, Samy Archimède, Itzel Marie Diaz, Gwengolo 2024
- Mengleuzioù *pistrius e Breizh*, Célia Izoard, Morgan Large, Catherine Le Gall, miz Du 2024
- Aodoù Breizh : *temptadur ar betoñs en arvor*, Jérémie Szpirglas, Denis Vannier, miz Genver 2025
- Ospitalioù publik : *un distruj programmet, ur marc'had evit ar gennad prevez*, Isabelle Jarjaille, Caroline Trouillet, Raphaël da Silva, miz Gouere 2025
- Ar gennad prevez oc'h ober e doull el liseoù labour-douar, Chloé Richard, Faustine Sternberg, miz Du 2025

Splann !

Ti ar vro
3, plasenn Maez ar Roue
22 200 Gwengamp

Penn renner an embann
Alain Goutal

Kazetennerien
Isabelle Jarjaille,
Caroline Trouillet

Tresadenoù

Achille Ménard

Kartennoù

Raphaël da Silva

Bet heuliet gant

Julie lallouët-Geffroy

Difazhiet gant

Julie Lallouët-Geffroy
Caroline Trouillet

Laket brav gant

Anne Caillet-Leroy

Troidigezh

Lena Catalán

Adlennet gant alvokadez

Claire Simonin

Mouller Roudenn

ZI de Bellevue

BP 10129

22 201 Gwengamp

Menegoù lezenn :

4^e trimiziad 2025

ISSN: 2800-664X

Embannet e miz Du 2025

Levrig n°10

